



HAL
open science

Ar verb e galianeg : ur studi gentañ evit kregiñ gant ar studioù keltiek

Yan Bouvart

► To cite this version:

Yan Bouvart. Ar verb e galianeg : ur studi gentañ evit kregiñ gant ar studioù keltiek. Literature. 2019. dumas-02290930

HAL Id: dumas-02290930

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-02290930>

Submitted on 18 Sep 2019

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0 International License

Skol-veur Roazhon II
MASTER YEZHOUÛ, LENNEGEZHIOÛ, HA
SEVENADURIOÛ ESTREN HA BROADEL
Brezhoneg ha Keltieg

**Ar verb e galianeg : ur studi gentañ
evit kregiñ gant ar studioù keltiek.**

Yan BOUVART
Rener : Herve BIHAN
2019

Ar verb e galianeg : ur studi gentañ evit kregiñ gant ar studioù keltiek.

Diverrad : Studiet eo bet mat a-walc'h ar galianeg, ar verb ennañ zoken. Koulskoude a chom traoù da gavout, ha reolennoù yezhadurel hollek da lakaat. Tostaet e vo er studi-mañ ar galianeg, dre ar verb, gant skouerioù resis, anat an aliesañ. Un hent kentañ war-zu peurrest ar studioù keltiek.

Abstract: If the Gaulish language is well studied today, including its verb, we still have many discoveries to make, and general grammatical rules to define. We tried in this study to approach the Gaulish language, by verbs, relying on specific examples, most often obvious. A first step towards Celtic studies.

Résumé : Si le gaulois est aujourd'hui bien étudié, y compris son verbe, il nous reste cependant bien des découvertes à faire, et des règles grammaticales générales à définir. Nous avons tenté dans cette étude d'approcher la langue gauloise, par les verbes, nous appuyant sur des exemples précis, le plus souvent évidents. Un premier pas vers les études celtiques.

KRENNADUR

DIGORADUR	5
MAMMENNOÙ	7
SPISC'HERIAOUEG	8
PENNAD I : INDEG-EUROPEG BETEK KELTIEG	9
<i>Ar yezhoù indek-europek</i>	<i>9</i>
<i>Kenyezhoniezh gentañ</i>	<i>12</i>
PENNAD II : EREEREZH – LEC'H AR VERB	13
<i>Ereerezh ar yezhoù indek-europek</i>	<i>13</i>
<i>Ar verb er yezhoù keltiek</i>	<i>13</i>
<i>Dishualded an ereadurezh – pouez an dibennoù-ger</i>	<i>14</i>
<i>Kudenn liested an ereadurezhioù e galianeg</i>	<i>15</i>
<i>Lec'h ar verb ha dishualded an ereadurezh</i>	<i>16</i>
<i>Pouez ar rener ?</i>	<i>17</i>
<i>Galianeg ha galleg, memes kan ?</i>	<i>17</i>
<i>Berradur</i>	<i>18</i>
PENNAD III : DISPLEGEREZH AR VERBOÙ	19
<i>Liesegezh ar verboù</i>	<i>19</i>
<i>Liesdoare ar verboù</i>	<i>19</i>
<i>An displegadurioù</i>	<i>20</i>

GOUR KENTAÑ AN UNANDER	20
<i>Amzer-vremañ-diskleriañ</i>	20
EIL GOUR AN UNANDER	27
<i>Amzer-vremañ-sujañ</i>	27
<i>Doare-gourc'hemenn</i>	28
TREDE GOUR AN UNANDER	30
<i>Amzer-vremañ-diskleriañ</i>	30
<i>Amzer-vremañ-sujañ</i>	31
<i>Amzer-dazont</i>	32
<i>Amzer-dremenet-strizh</i>	32
TREDE GOUR AL LIESTER	40
STUMMOÙ DIANAT	47
KLOZADUR	53
LEVRLENNADUR	57
SKEUDENNOÙ	59

DIGORADUR

Ma'z e vefe dav termeniñ ar galianeg, e chomfed gant muioc'h a c'houlenn evit respontoù. Orin ar yezh-se ; al liammoù gant ar yezhoù all a hed an amzer, hen yezhoù pe yezhoù arnevez ; ar yezhadur resis ; hag ar c'heriaoueg : abaoe deroù studi ar galianeg e ya ar c'hevrin gantañ. Muioc'h mui e vez dizoloet traoù nevez koulskoude, ha ni da beurdreñ testennoù ha testennoù e galianeg ; ha ni da beuzc'hlokaat ar geriadurioù ; ha ni da sevel levrioù ha pennadoù hiroc'h-hirañ war boent pe boent ar yezhadur. Rak hiziv c'hoazh e vez kavet skrivadurioù, testennoù, roudoù bennak an hen yezh-se. Ha tamm-ha-tamm e vez graet e vragoù da Vercingetorix.

Studiañ ar galianeg n'eo ket aes : anat eo an orin indek-europek, hogen diaes eo tresañ liammoù resis etre ar yezhoù indek-europek o-unan. Anat ivez doare keltiek ar galianeg : keñveriañ ouzh yezhoù keltiek all, arnevez zoken zo gallus. Ar pezh a lak hep dale ur gudenn a-bouez : diforc'hioù bras zo eveshaus ivez etreze. Testennoù hir ha lennegel e latin zo padet bennomp : n'ez eus ket e galianeg. Ouzhpenn-se, eo diaes alies da lenn ar pezh hon eus kavet, a zo berr a-walc'h a-wezhioù. E-se eo diaes meizañ ar yezhadur, distagañ ar gerioù e-barzh al lavarennoù, distagañ al lavarennoù e-barzh an destennoù.

N'eo ket achu al labour war ar galianeg ; an arbennigourion a c'hoanag kavout c'hoazh testennoù hir a-walc'h evit ledanaat hor gouiziegezh. D'am meno e c'hell bezañ gwelloc'h-gwellañ an traoù. E klozadur levr *Les druides*, Guyonvarc'h ha Le Roux a skrive 60 bloaz zo¹ :

"Il faut nous faire à l'idée, pour pénible qu'elle soit, que le gaulois, langue sacrée, a disparu avec ceux qui le parlaient et avec les druides qui l'enseignaient. L'écriture était pour eux un moyen de fixation, donc de mort, une chose inerte, en contradiction avec la loi de la vie qui est l'évolution, et ils n'avaient aucune raison de nous léguer un cadavre. Les linguistes de notre temps ont la maigre consolation de la phonologie (d'après les toponymes et les anthroponymes) et d'une faible partie du vocabulaire. Ils ne sauront jamais la grammaire."

¹ GUYONVARC'H C.J. et F. LE ROUX, *Les druides*, eil emb., Roazhon, Ogam-Celticum, 1978., p. 345.

Diaes e vefe skrivañ ar c'hontrol. Kollet e vefe ar galianeg, neuze ? Ne c'hellfemp ket gwellaat ken hor meizadur eus ar yezh-se ? Ne gredan ket. Gwir a zo bet kollet an darn vrasañ eus geriaoueg ar "C'halianed". Gwir eo dreist-holl evit ar verboù, n'int ket anavezet nemet un nebeut anezhe. N'eo ket pouezus. Gwelloc'h a vefe kavout an elfennoù-se a-bezh, anat. Koulskoude traoù a-walc'h hon eus evit prederiañ, meizañ ha sevel ur tres kentañ eus stad hor gouiziegezh eus ar galianeg. Rak ret eo kerzhout war un hent all bremañ. E-pad re bell hon eus klasket kavout testennoù nevez, lennegel, hir, barzhonius, leun a c'heriaouegoù pinvidik, kavout ur burzhud-skrid a echufe ar studi erfin. Bremañ eo ret d'ar studi kemer un hent all. Ret eo mont pelloc'h hep gortoz elfennoù all. Deomp da lakaat goulennoù all, goulennoù ledanoc'h.

Marteze e vo a-walc'h an danvez evit donaat "*l'étude de la matière celtique*" ? Gouzout a reomp n'hon eus ket verboù galianek a-galz. Un nebeud. Netra. A-walc'h evit harz ar studi ? N'eo ket. A-walc'h evit rakklozañ anezhañ. N'eo ket pinvidigezh ar verboù hon eus kavet a zo pouezus, hogen ar reolennoù resis ha padus e c'hellomp hen dezastum.

Setu pal ar skrid-mañ. Meizañ stad studi ar galianeg, ha klask gober un tres kentañ eus reolennoù, yezhadurioù, amzerioù ar verb. Meur a vartezeadenn zo da lakaat c'hoazh, anat eo. E-se e vo ret bezañ evezhiek. Arabat bezañ aon memestra : pet a c'herioù "adsevel" a zo en "indeg-europeg" ? Re marteze. Mes n'ez eus ket e galianeg. C'hoant am eus gant ar c'hounskrid-mañ donaat ma gouiziegezh war ar galianeg, dre studi ar verb, ha klask gouzout ma'z e vefe poellek lakaat reolennoù resis evit poent.

MAMMENNOÙ

Hep mar eo ar mammennoù eus an elfennoù pouezusañ er studi-mañ. Dre skridoù an arbennigourien, brudet pe get, hen pe nevez, e vez kejet ar galianeg evit ar wezh gentañ alies. Gwir e oa evidon. Penaos studial stumm ar galianeg hep lenn Lambert ? Penaos gwelout liv ar galianeg er brezhoneg hep skoazell Favereau ? Ha penaos meizañ sonennoù ar galianeg hep Delamarre ? Peogwir eo bet kroget studi ar galianeg (ha meur a skiant ivez !) gant arbennigourien, eo ret, evit derc'hel, lenn anezhe, a-raok studial e-unan.

Mammennoù a zaou zoare a zo : ar re gentañ hag ar re eil. Evit al labour-mañ eo aesoc'h labourat gant ar re eil, skridoù skiantel ha sirius, graet gant arbennigourien anavezet. Graet e oa. Kavet e vo e-barzh pajennoù a heul anvioù brudet ha boutin war studi ar galianeg, evel Pierre-Yves Lambert, Xavier Delamarre, pe Francis Favereau. O levrioù zo ret da lenn, hag int da endalc'h gouiziegezhioù a-bouez hag anat. N'eus ket tu studial ar galianeg hep lenn anezhe. Koulskoude eo ret gouzout a zeu war-raok an amzer, ha ret e vo a-raok pell skrivañ levrioù nevez c'hoazh, gant kavadennoù diwezhañ.

Lod all zo anavezet evit labourioù disheñvel : Philippe Jouët, Venceslas Kruta, André Martinet, Colin Renfrew, Christian-J. Guyonvarc'h ha Françoise Le Roux, Martin J. Ball, James Fife... Ret eo o labour evit ledanaat ar studi hag ar meizadur : meur a zanvez skiantel zo liammet. Ha n'eo ket anavezet a-walc'h hiziv : d'am meno ne c'hellint ket ar skiantoù bezañ studiet mat a-walc'h hep en em skoazellañ etreze : yezhourien, "gwengelourien", hendraourien...

N'int ket ken brudet arbennigourion all. Pierre Gastal, Arnaud Delanoy, Arzel Even. Elfennoù dedennus e c'heller kavout en o oberennoù, hogen traoù peuzsirius a c'hell bezañ lennet ivez. Evit echuiñ, skiantourien all o deus graet ul labour dispar bloavezhioù zo, hogen un nebeud kozh e c'hell bezañ bremañ : Henry Lewis, Holger Pedersen, Franz Bopp, Joseph Vendryes, ha Georges Dottin. Dedennus int evit ar pezh o deus studiet hag a chom gwir c'hoazh, ha dedennus ivez evit meizañ emdroadur ar studi a hed an amzer.

Ar mammennoù kentañ zo an traoù-test studiet gant an arbennigourion. Evit studial anezhe eo ret kaout ur vestroniezh wir, barrek war an danvez studiet. Koulskoude eo pouezus ivez evit ar studier, a c'hell keñveriañ anezhe ouzh meizadurioù ar skiantourien, ha kaout ur sell resisoc'h a c'hell ivez. Pa oa gallus din, sellet am eus ouzh luc'h-skeudennoù pe dresadennoù ar skridoù galianek : ur gwir deskadenn. Meizañ an doareoù skrivañ, a zo disheñvel etreze alies, meizañ lennadur ha troadur an arbennigourien, zo dedennus kenañ.

SPISC'HERIAOUEG

Evit sklaeraat ar c'healioù kavet er c'hounskrid-mañ, ha peogwir ne vez ket studiet c'hoazh an holl zanvezioù skiantel e brezhoneg, e oa ret, d'am meno, sevel ur spisc'heriaoueg resis a ro gerioù am boa ezhomm evit gober ar skrid-mañ. Gwir, diouer a ra gerioù e brezhoneg. Reoù all n'int ket kalz anavezet. Peogwir e vezont gwelet e galleg (aet eo pell-pell ar skiant gant ar yezh-se), hag anavezet int mat gant ar vrezhonegerien, lakaet am eus ar gerioù e brezhoneg, ha troet e-kichen e galleg. Teir zro am eus kavet : ar gerioù skrivet e brezhoneg, ha kavet meur a wezh : evite kudenn ebet, sklaer int, anat hag anavezet ; ar c'healioù n'o deus ket gerioù lennet pe glevet e brezhoneg : ret e oa din sevel anezhe ; hag ar gerioù zo bet krouet pe droet e brezhoneg (diwar ar galleg peurliesañ) hogen en un doare diresis pe direizh. Setu skouerioù a bep rummad : amzer-dazont, raganv, renadenn ; dizibenngeradur, kenvogaladurioù ; amzer-zispis sigmaek, tro-goanagiñ, tro-c'hoantaat...

amzer-dazont	<i>futur</i>	liester-stagañ	<i>pluriel relatif</i>
amzer-dremenet-strizh	<i>prétérit</i>	lostger	<i>suffixe</i>
amzer-vremañ	<i>présent</i>	penngef	<i>radical, thème.</i>
amzer-vremañ-diskleriañ	<i>pr. de l'indic.</i>	raganv	<i>pronom</i>
amzer-vremañ-sujañ	<i>pr. du subj.</i>	raganv-rener lostgeriet	<i>pron. sujet suffixé</i>
amzer-zispis sigmaek	<i>aoriste sigmatique</i>	raganv-tra staget	<i>pr. d'obj. clitique</i>
dibenn-ger	<i>désinence</i>	rannig-stagañ	<i>particule relativisante</i>
dic'houzañv	<i>déponent</i>	rannig isurzhiat	<i>particule subordonnée</i>
digelfek	<i>athématique</i>	renadenn	<i>complément, objet</i>
displegadur	<i>conjugaison</i>	rener	<i>sujet</i>
dizibenngeradur	<i>apocope</i>	stambouc'h	<i>emphase</i>
doare-gourc'hemenn	<i>impératif</i>	treuzamzeriek	<i>diachronique</i>
engeradur	<i>infixation</i>	tro-c'hervel	<i>vocatif</i>
ereadurezh	<i>ligature</i>	tro-c'hoantaat	<i>désidératif</i>
ereerezh	<i>syntaxe</i>	tu-damc'houzañv	<i>voix medio-passive</i>
ger-etre	<i>participe</i>	tro-gaout	<i>génitif</i>
kelf	<i>thème</i>	tu-gra	<i>voix active</i>
kenger	<i>affixe</i>	tro-reiñ	<i>datif</i>
kengensonadurioù	<i>allitération</i>	tro-renadenn	<i>accusatif</i>
kensonenn dre fic'hal	<i>affriquée</i>	tro-rener	<i>nominatif</i>
kenvogaladurioù	<i>assonance</i>	tro-goanagiñ	<i>optatif</i>
kreizet	<i>focalisé</i>	tro-lec'hiañ	<i>locatif</i>
liester-gouzañv	<i>pluriel passif</i>	tro-zoare	<i>instrumental</i>

PENNAD I

INDEG-EUROPEG BETEK KELTIEG

Ar yezhoù indek-europek

Luziet hag hir e vefe renabliñ amañ ar pezh e kredomp a-zivout ar "yezhoù indek-europek". Liammoù pe levezon a c'hell bezañ etre ar yezhoù zo da c'houzout koulskoude. Dreist-holl evit studial ar galianeg. Buan-ha-buan e c'hell bout lakaet war-wel elfennoù a ziskouez hon diouiziegezh muioc'h evit hon divarded.

Ur yezh anvet "indeg-europeg" zo meizet gant darn vrasañ an arbennigourien evit displegañ orin pennañ ar yezhoù "indek-europek" a-vremañ eta.² Emdreiñ a rafe ar yezh-se betek en em rannañ ha mont da vezañ meur a yezh, un degad bennaket. Ar "c'heltieg", pe "geltieg boutin" a vefe en o zouez, emdroet c'hoazh gant daou strollad yezh : ar yezhoù keltiek kevandirel hag ar re enezel. Er strollad kentañ e kaver al leponteg, ar c'heltieg-iberieg, ar galianeg ; en eil emañ ar predeneg hag ar gouezeleg. Diaes eo mont pelloc'h hep mar evit skrivañ gwir. Dianat abeg al liammoù etre ar yezhoù indek-europek, dianat o orinoù kentañ.

Martezeadennoù zo bet savet evit displegañ an nester hag an diforc'hioù etre ar yezhoù indek-europek : n'eo ket pal ar skrid-mañ niveriñ anezhe. Koulskoude e c'heller lenn skouerioù a zo roet gant an arbennigourien. Arzel Even a skrive :

*" (...) e ranker krediñ e voe un amzer pell-meurbet ma ne oa ar c'heltieg, al latin, ar germaneg, h.a. nemet ur yezh hepken. (...) Hag endra bellae rummadoù an indezeuropegerien diouzh o bro ez ae o yezhoù war zisheñvelaat, dre ziouer a yezh skrivet hag a zarempredoù gant ar pobloù kenouenn, ha moarvat ivez dre levezon yezhoù ha pobloù trec'het ha sujet gant Indezeuropiz. Ken e teuas an indezeuropeg d'en em rannañ e meur a yezh digomprenadus an eil evit eben (...)."*³

Diouzhtu e vez gwelet eo diaes dezhañ kaout ur menoz krenn ha krak : n'eo ket anat hiziv c'hoazh kaout ar wirionez resis diwar orinoù an holl yezhoù indek-europek. Hag-eñ e oa yezhoù a-raok an indeg-europeg ? Ma'y e oa, peseurt levezon o deus bet ? Goulennoù a-galz a chom, ha nemet un nebeut respontoù zo bet lakaet, a sach kudennoù nevez a-wezhioù.

² JOUËT P., *Dictionnaire de la mythologie et de la religion celtiques*, Fouesnant, Yoran Embanner, 2012, p. 11 ; KRUTA V., *Les Celtes : histoire et dictionnaire des origines à la romanisation et au christianisme*, Paris, R. Laffont, 2000, 65.

³ ARZEL EVEN, *Istor ar yezhoù keltiek*, Hor Yezh, 1987, vol. 2/1, p. 2.

Resisoc'h eo A. Martinet neoazh en e levr brudet ha dispar war an danvez-se.⁴ Ma'y eo sklaeroc'h an "indeg-europeg", lakaat a ra ur gudenn ouzhpenn :

"La découverte, au début du XXe siècle, de nouvelles langues, comme le tokharien et le hittite, évidemment apparentées à celles qu'on considérait comme indo-européennes, est venue renforcer la conception d'un indo-européen évoluant dans le temps, comme toutes les langues, en suggérant la possibilité, voire la vraisemblance, de séparations successives à partir du tronc commun. Dans ces conditions, la reconstruction ne peut plus être celle d'un état de langue conçu comme parfaitement stable, à l'image de ce que sont souvent, dans notre imaginaire, nos langues nationales contemporaines. Elle devient celle d'un processus évolutif qui se poursuit depuis la nuit des temps."

Ne c'heller ket adsevel ger ebet en "indeg-europeg", rak o emdreñ e voe dalc'hmat a hed an amzer, betek en em rannañ. Ha da zerc'hel an emdroadurioù. Setu ur meizad eveshaus a ya a-enep boazioù ar yezhourien. Dav eo deomp derc'hel soñj e oa nemet "stummoù dibadel" ar gerioù e adsaver ken alies. Pelloc'h a ya M. Alinei. E-barzh Henoadvezh ar maen e wel orin an indeg-europeg, ar pezh a beuzliammfe an indeg-europeg ouzh emziskouezidigezh al lavar :

*"The Proto-IE lexicon, i.e. the lexicon common to all IE languages, which includes among other things grammatical words such as personal pronouns, WH- words and the like, forms by definition its earliest layer. As such it ought to be placed in the depth of Paleolithic, and be seen as reflecting the awakening and developing of human conscience and cultural activities of an already separated and independent language phylum. In fact, the differences in the lexicon of the grammatical structure shown by most language phyla should suffice to disqualify as meaningless any research aiming at reconstructing a universal monogenetic lexicon (cp. e.g. Ruhlen 1994). (...) All of this seems to correspond quite closely with what we should expect if one or more populations speaking one and the same language –such as the Proto-Indo-Europeans or the Proto-Uralic people- had first spread to Europe from Africa, and then had broken up into different groups (cultural 'orbits'), as a result of their exposure first to different ecological niches, different social networks and different neighbors, then to waves of intrusive immigrants introducing agriculture and stock-raising in Neolithic, and later, in the Metal Ages, when stratified societies develop, to waves of invading elites of akin or distant groups, speaking cognate or foreign languages."*⁵

⁴ MARTINET A., *Des steppes aux océans : l'indo-européen et les « indo-européens »*, Paris, Payot, 1986, p. 14.

⁵ ALINEI M., ha BENOZZO F., *The Paleolithic Continuity Paradigm - Introduction*, <http://www.continuitas.org/intro.html>, lennet d'an 10 a viz Gwengolo 2018.

Martezeadennoù zo, emglevioù hollek ne skrivan ket. Koulskoude eo anat un darvoud : disheñveloc'h-disheñvelañ eo ar yezhoù indek-europek abaoe hon eus roudoù anezhe. Pep hini a emdro en e du en ur zerc'hel eskemm gant yezhoù all c'hoazh : mar o deus ar yezhoù keltiek a-hiziv un orin boutin, emañ o pellaat an eil re ouzh ar re all : brezhoneg, kembraeg ha kernevveureg a oa tost-tre er grennamzer c'hoazh.⁶ Setu perak e c'heller skrivañ *emdroadur ar yezhoù*, dreist-holl evit yezhoù indek-europek.

Ne vo ket studiet an danvez-se amañ. Hogen elfennoù istorel dedennus e c'hellomp kounaat memestra evit kregiñ gant ar galianeg. Ne vefe ket poellek skrivañ amañ istor ar studioù keltiek, koulskoude eo ret degas koun eus an darvoudoù o deus kaset war-raok meizadur ar yezhoù keltiek hon eus bremañ, abaoe arbennigourien gentañ ar yezhoù indek-europek ; graet e vo en eilpennad a heul.

⁶ In BALL M.J. ha J. FIFE (ren.), *The Celtic languages*, London, New York : Routledge, 1993., p. 40 : "*This process, purported to have begun towards the end of the fifth century and completed by the middle of the sixth, is singled out as the crucial feature marking the death of British and birth of welsh and its sister neo-British languages.*"

Kenyezhoniezh gentañ

E 1767, ur Jezuist gall, *Gaston-Laurent Coeurdoux*, a skrivas d'an "*Académie des belles-lettres et inscriptions*", e Paris. An heñvelder etre sanskriteg, latin ha gresianeg e lak war-wel en e lizher. En India edo ar beleg abaoe 1732, anavezet mat gantañ lennegezh hag istor ar vro.⁷ Etre yezhoù Europa hag India eo graet ul liamm, gant menoz e vefe un orin boutin d'ar yezhoù-se,⁸ kant vloaz goude *Marcus Zuerius van Boxhorn*.⁹

Arabat isprizout pouez ar menoz-se, hag an darvoudoù a darzho dioutañ. Div c'hanedigezh eo e Bed ar studioù yezhoniel : martezeadenn an "indeg-europeg", hag hentennoniezh ar genyezhoniezh. Honnen a oa meizet e oa mat honnen gant Coeurdoux, a verze heñvelderioù ar gerioù daoust d'o emdroadurioù hag orin boutin hag hen, ha neket bepred daoust d'an eskemmoù er prantad arnevez. Siwazh eo bet ankounac'haet menozioù kenyezhoniel ar jezuist, betek *William Jones*, hag ar beleg *Paulin de Saint-Barthélemy*, a lake war-wel ivez al liammoù etre yezhoù Europa hag ar sanskriteg.¹⁰

Franz Bopp a lak ur c'hemm bras gant e levrioù *Über das Konjugationssystem der Sanskritsprache in Vergleichung mit jenem der griechischen, lateinischen, persischen und germanischen Sprache* e 1816, ha *Vergleichende Grammatik des Sanskrit, Zend, Griechischen, Lateinischen, Litauischen, Gotischen und Deutschen* etre 1833 ha 1852.¹¹ Ur galloud nevez a zeu d'ar yezhourien gant labour Bopp. N'eo ket keñveriet ar yezhoù nemetken, hogen studiet eo ouzhpenn istor kemmoù ar yezhoù, o orinoù, o abegoù, penaos e teue ur yezh da vout meur a hini, dre hent-pe-hent. E-se e tizer skiant arnevez ar yezhoù.

Ouzhpenn-se e c'heller kavout n'eo ket ar yezhoniezh hi-unan al liamm istorel etre Europa hag Asia a sklaerafe an eskemmoù hen etre ar pobloù. Ar geñveroniezh zo graet ganti bremañ evit skiantoù all : gwenngeloniezh da skouer. Siwazh n'ez eus ket arbennigourien nevez a-walc'h evit studial ar skiantoù-se, ar pezh zo klevet mat en danvez "*galianek*".

⁷ Digoradur Michel Bréal in BOPP F., *Grammaire comparée des langues indo-européennes.*, 1866, vol. 5/1, p. XVI.

⁸ Digoradur Michel Bréal in BOPP F., 1866, vol. 5/1, p. XIX.

⁹ DROIXHE D., « Souvenirs de Babel », pp. 55-74 : MZ van Boxhorn (1612-1653), en doa gwelet an heñvelderioù etre yezhoù europek hag aziiek (a oa anavezet endeo d'ar mare-se), a soñje e voe ur yezh e orin ar re a oa en Europa. Anvet e oa gantañ "*skiteg*". En diwezh n'o doe ket ur gwir levezon e venozioù, a oa broadelerel ha damreizhek ouzhpenn.

¹⁰ Digoradur Michel Bréal in BOPP F., 1866, vol. 5/1, p. XIX.

¹¹ GABRIEL BERGOUNIOUX, *GRAMMAIRE COMPARÉE DES LANGUES INDO-EUROPÉENNES*, <http://www.universalis.fr/encyclopedie/grammaire-comparee-des-langues-indo-europeennes/>.

PENNAD II

EREEREZH - LEC'H AR VERB

Ereerezh ar yezhoù indek-europek

Dre voaz e vez sellet resis ouzh lec'h ar verb hag ar renadenn evit "rannañ" ar yezhoù indek-europek : yezhoù zo gant ar renadenn dirak ar verb, ha reoù all zo ganti goude.¹² Ar stumm Renadenn-Verb zo hini an testennoù indek-europek koshañ, hag a vefe hini orin an "indeg-europeg". Ar yezhoù indek-europek a-vremañ en Azia o deus ar framm Rn-V bepred, hag ar yezhoù en Europa zo savet gant ar stumm V-Rn kentoc'h.¹³ Soñjal a c'heller a voe un emdroadur etre an orinoù indek-europek hag ar yezhoù europek eta.

Ar verb er yezhoù keltiek

Sellomp rik ouzh ereadurezh ar yezhoù keltiek. Emañ ar verb e penn en iwerzhoneg hen hag arnevez.¹⁴ Un elfenn all a c'hell bezañ lakaet a-raok ar verb koulskoude, evit ar stambouc'h¹⁵, pe bouez ar c'helaouadurioù.¹⁶ Dishual eo lec'h ar gerioù all el lavarenn. Emañ c'hoazh an dishualded-se e-barzh ar yezhoù keltiek a-bezh. Staget e vez ar verb el lavarenn bepred, ha dishual mat lec'h peurrest ar gerioù. Er yezhoù predenek eo klevet ivez : emañ ar verb en eil e brezhoneg hag e krenngembraeg, goude ur ger all a vefe bet kreizet gwezhall (*focalisé, focused*), hag a zo hiziv ar penndanvez kentoc'h.¹⁷ A-zivout ar yezhoù keltiek eo dedennus neuze merzout pouez ar verb lakaet gant e lec'h el lavarenn.

¹² GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 83.

¹³ RENFREW C., *L'énigme indo-européenne : archéologie et langage*, Paris, Flammarion, 1994, pp. 138-139.

¹⁴ VENDRYES J., *Grammaire du vieil-irlandais : (phonétique - morphologie - syntaxe)*, Paris, Guilmoto, 1908, p. 305 : "§ 568. L'ordre des mots est soumis aux mêmes règles dans les propositions principales et dans les propositions subordonnées ; c'est-à-dire que dans ces dernières, après le mot - conjonction ou particule - qui exprime la subordination, les autres mots sont rangés comme si la proposition était principale." ; ha : "§ 569. En règle générale, le verbe, précédé, s'il y a lieu, des éléments proclitiques qui font corps avec lui (§ 588), passe avant sujet et régimes ; toutefois, l'interrogatif (§ 559) se place toujours devant le verbe".

¹⁵ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 68.

¹⁶ VENDRYES J., 1908, p. 307 : "§ 575. Lorsque celui qui parle veut insister spécialement sur un mot de la phrase autre que le verbe, il peut l'exprimer en tête à condition de le faire précéder du verbe copule." ; p.309 : "§ 579. La langue présente çà et là quelques dérogations au principe de l'ordre des mots. S'il y a intérêt à mettre en évidence un des mots de la phrase, on peut le jeter en tête, en dehors de la construction grammaticale, quitte à le rappeler ensuite au moyen d'un pronom."

¹⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 68.

Georges Dottin a skriv neoazh e-barzh *LANGUE GAULOISE* : "*Tandis que la construction de la phrase gaélique et brittonique comporte l'ordre suivant*¹⁸ : *verbe, sujet, complément, les mots de toutes les phrases gauloises qui sont parvenus jusqu'à nous sont rangés à peu près dans le même ordre qu'en latin, mais aucune ne présente le verbe en tête de phrase[...]*".¹⁹ Hag eñ da rollañ skouerioù.²⁰ Mar n'eo ket peurunvanet ereadurezhioù al lavarennoù roet gant Dottin, e vez kavet ar verb en eil alies, ar pezh n'eo bet ket pouezet a-walc'h gantañ, d'am meno. Dottin a lak war-raok ur c'hemm etre ar galianeg hag ar yezhoù keltiek all.²¹ En tu all, yezhourien a bouez an diforc'h etre latin ha galianeg. Ar pezh a lak war-wel diaester studi ar galianeg ha keñveriañ gant yezhoù all.

Dishualded an ereadurezh – pouez an dibennoù-ger

Gwelet hon eus e oa diaes lakaat ur reolenn resis evit lec'h ar verb er yezhoù keltiek. Emañ e penn en iwerzhoneg, hag en eil er yezhoù predenek. Sellout ouzh an ereerezh dre-vras a vefe pouezusoc'h marteze. Nemet lec'h ar verb, eo dishual a-walc'h ereerezh ar yezhoù keltiek arnevez. Hag al latin da vout ken dishual : mar eo ur yezh savet gant ar framm Rener-Renadenn-Verb peurliesañ, an dibennerezh-ger a aesa an ereadurezh dieub : kargoù ar gerioù zo klevet gant an dibennoù-ger, n'eo ket gant lec'h ar ger el lavarenn, pe gant ur ger-mel bennak, evel e meur a yezh arnevez o deus staget lec'h pep ger ha n'o deus displegadurioù anv ha renadenn ken. Disheñvel eo ster al lavarennoù-se e galleg : "*Le chat mange la souris*", "*La souris mange le chat*", "*Un chat mange des souris*", pe c'hoazh "*Chat souris le un mange*". Sklaer evel lagad an naer eo talvoudus ar gerioù-mell ha lec'h ar gerioù evit meizañ mat ster al lavarenn. Ha dishualded an ereadurezh da vout un alc'hwez evit meizañ ar galianeg ?

¹⁸ Skrivet ivez gant Lewis ha Pedersen "*Normally in insular Celt. the verb stands at the head of the sentence.*", LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961.

¹⁹ DOTTIN G., *La langue gauloise : grammaire, textes et glossaires*, Genève, Slatkine Repr, 1985, p. 125.

²⁰ "1° sujet, (verbe), complément indirect, complément direct (...); 2° sujet, verbe, complément circonstanciel, complément direct, complément indirect (...); 3° sujet, verbe, compléments indirect et circonstanciel (...); 4° sujet, verbe, compléments indirect et circonstanciel, complément direct (...); 5° complément direct, sujet, (verbe) (...); 6° sujet, complément direct, verbe, compléments circonstanciel et indirect (...); 7° complément indirect, (verbe), sujets (...)."

²¹ Nemet ar re arnevez, disheñvel c'hoazh (ar verb e brezhoneg, da skouer. Sellit uheloc'h).

Kudenn liested an ereadurezhioù e galianeg

Gwelet hon eus penaos e vefe frammet ar yezhoù-se :

indeg-europeg : RENADENN – VERB

heniwerzhoneg : VERB – RENADENN

yezhoù europek : VERB – RENADENN

krennc'hembraeg : RENADENN – VERB

latin : RENADENN – VERB

Ha diwar ar galianeg ? E gwirionez n'hon eus ket kavet un ereadurezh resis, ingal hag anat e galianeg. Ar pezh a c'hell bezañ iskis da gentañ-holl : ne vefe ket a-walc'h kavout ur frazenn evit anavezout ereerezh ar galianeg a-bezh ? Gwir eo diaes gouzout ; meur a stumm zo bet kavet : RENER-VERB-RENADENN, VERB-RENER-RENADENN, pe RENER-RENADENN-VERB. Eska hag Evans²² a lak war wel un urzh a vefe hini boutinañ, Rr-V-Rn.²³

Koulskoude e c'hellfe kemm ereadurezh al lavarenn diouzh ar c'henarroud. Hervez Eska hag Evans e vefe ar verb e penn pa'z eo en doare-gourc'hemenn, pe evit lakaat stambouc'h, peurzishañvelder... : V-Rr-Rn. Gant an iwerzhoneg e c'hellfemp keñveriañ.²⁴ Koulskoude e vefe gin lec'h ar verb en iwerzhoneg hag e galianeg : pa vefe Rr-V-Rn ar stumm boutin e galianeg, e kaver V-Rr-Rn en iwerzhoneg ; lakaet e gin Rener ha Verb gant stummoù resis (doare-gourc'hemenn, stambouc'h, peurzishañvelder, pouez ar c'helaouadur...). A-zivout ar framm V-Rr-Rn, gwelet eo pa'z emañ ivez ur raganv-tra staget, pe ur rannig-stagañ/isurzhiat.²⁵ Evit berrañ eo kavet alies e galianeg ar stumm V-Rn, hogen n'eo ket an hini nemetañ neoazh.

Evit skeudenniñ ar pezh e c'heller lenn, setu amañ da heul skouerioù gerioù o deus lec'hioù disheñvel el lavarenn galianek²⁶ :

ELVONTIV IEVRU.ANEVNO OCLICNO.LVGVRIX ANEVNICNO

RENADENN - VERB - RENER

SACER PEROCO IEVRV DVORICO ° V ° S ° L ° M

RENER - VERB - RENADENN

NATA VIMPI | POTA VIM

RENER - VERB - RENADENN

²² BALL M.J. ha J. FIFE (ren.), *The Celtic languages*, London, New York : Routledge, 1993, p. 40.

²³ Skrivet ivez gant ARZEL EVEN, in *Istor ar yezhoù keltiek*, Hor Yezh, 1987, vol. 2/1.

²⁴ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 68.

²⁵ BALL M.J. ha J. FIFE (dir.), 1993, p. 40 : "clitic object pronoun or relativizing/subordinating particle". Ha pelloc'h : "This is due to a restriction placed on the operation of Wackernagel's Rule (...), whereby such clitics must occupy second position in the sentence, to a state in wich only the verb and certain particles were permitted to serve as host to such clitics."

²⁶ Lavarennoù a heul tennet eus LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 94, 95, 124, 123 ha 93.

NATA VIMPI | CVRMI DA**RENER - RENADENN - VERB****RATIN BRIVATIOM *FRONTU.TARBEISONIOS* IEVRV****RENADENN - *RENER* - VERB**

N'eo ket anat lec'h ar verboù er skouerioù-se eta. Amañ eo sklaer pouez an dibennoù-ger evit meizañ ster ar frazennoù. Gant an div lavarenn zoken a grog gant *NATA VIMPI* (...), lavarennoù nes-nes, e welomp urzhioù disheñvel etreze. Mar ez eus dibennadurioù-ger e galianeg, ar skridoù kavet a ziskouez un ereadurezh dieub, niverus ar skouerioù disheñvel.

Lec'h ar verb ha dishualded an ereadurezh

Daou c'houlenn zo lakaet diwar ar verb en ereerezh galianek :

1. *Daoust hag un ereadurezh "reizhek" a oa e galianeg, ha penaos bras e oa dishual ?*

2. *Pelec'h emañ ar verb el lavarenn c'halianek, mar en deus ul lec'h resis ?*

Pa vo dirouestlet an daou boent-se e vo d'am soñj kaset da netra lod a ziemglevioù etre an arbennigourion. Ret eo c'hoazh kavout testennoù all, hir a-walc'h evit boueta ar studi. Gallout a c'hellfemp soñjal e oa peurzishual ereadurezh ar galianeg. Pe grediñ eo bet lakaet ha staget urzh ar gerioù er galianeg, ouzhpenn an dibennerezh-ger ? Marteze emañ ar wirionez etre an daou. Klaskomp chom gant ar pezh a zo bet skrivet. Hervez Lambert e c'heller dezevout e oa dieub a-walc'h urzh ar gerioù e galianeg, abalamour d'an dibennoù-ger, a lak ur garg ; ha gant skridoù daleüs a vefe staget ha reizhet urzh ar gerioù, abalamour da gemmesk an dibennoù-ger (**-os / -on**).²⁷ Neuze e vefe e galianeg lavarennoù gant dibennoù-ger a rofe kargoù resis, ha koulskoude e stagfe mui-pe-vui urzh ar gerioù el lavarenn. Lakomp. Ne vefe ket pell eus ar pezh e lennomp e latin. Sklaer ruz eo gant skouerioù *NATA*... Rr-V-Rn ha Rr-Rn-V : boazioù ha reolennoù a oa marteze evit an ereerezh dre-vras, hogen an dibennoù-ger hag ar c'henarroud a leze un dishualded wir evit stummañ al lavarenn.

Evit mont pelloc'h, e welan ur gudenn all : daoust hag ereerezh "reizhekañ" ar galianeg zo tost ouzh an orin indek-europek (Rn-V), pe ouzh ar yezhoù europek (V-Rn) ? Gallout a reomp keñveriañ emdroadur ar yezhoù europek diouzh o orin indek-europek, hag ar galianeg ? Hiziv c'hoazh eo diaes respont.

²⁷ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 69.

Pouez ar rener ?

Diouzh ar skouerioù hon eus e galianeg, eo anatoc'h din pouez ar rener eget hini ar renadenn el lavarenn c'halianek. Peurliesañ eo kavet ar rener e penn al lavarenn ; ar verb o klask tostaat outañ. Marteze e vefe e galianeg isurzhiat lec'h ar renadenn ouzh lec'hioù ar rener hag ar verb a vefe int reolennek. Rak-se e vefe ret sevel al lavarenn diouzh reolennoù staget ouzh ar rener hag ar verb (marteze an urzh Rr-V, ha nester ar verb hag ar rener), ha lec'h peurrest ar gerioù a vefe dishual a-walc'h, penn-da-benn al lavarenn. Marteze e vefe ret prederiañ disheñvel ha studial lec'h ar verb diouzh ar rener, neket diouzh ar renadenn, a vefe isurzhiat dezhe ?

Galianeg ha galleg, memes kan ?

Ne c'hell ket bout lakaet ur reolenn resis hollek hag anat diouzh ar pezh hon eus kavet. Koulskoude e ouzomp un dra dedennus, merket gant Pierre Gastal : al latin a lak ar renadenn dirak ar verb, hogen ar c'hontrol a ra ar galleg. Ne zeu ket ereadurezh-se ar galleg eus al latin neuze, ha marteze e c'heller peuzwiriañ Pierre Gastal a ra ul liamm etre galianeg ha galleg, evit displegañ an ereadurezh Verb-Renadenn ? Ouzhpenn-se a gas d'hor soñj c'hoazh Pierre Gastal e vez kavet muioc'h a wezh V-Rn e galianeg, evel ar galleg, ha disheñvel e vefe eus an orin indek-europek. Un hentennoniezh dedennus hogen n'eo ket anatadus c'hoazh.

Berradur

Evit renabliñ e vefe an urzh boutin gant ar verb en eil, evel er yezhoù predenek, lec'h ar renadennoù a vefe dishual. Hag evit palioù resis, evel ar stambouc'h, an douare-gourc'hemenn, pe bouezañ war un elfenn resis, e vefe klevet ivez ar verb e penn-kentañ. Amañ izeloc'h un daolenn a verra ar pezh e ouzomp diwar ar yezhoù keltiek, al latin hag ar galleg, lakaet e-kichen ar pezh a vefe reolennek e galianeg. Ar pezh e c'hellfemp skrivañ hep bout diwiriet zo lec'h ar verb hag ar rener. War va meno, e vefe dishual a-walc'h urzh ar gerioù all el lavarenn :

	<i>Stummoù boutin</i>	<i>Stummoù divoutin</i>
IWERZHONEG	V – Rr/Rn – Rr/Rn	Rr/Rn – V – Rr/Rn
BREZHONEG	Rr/Rn – V – Rr/Rn	
GALLEG	Rr – V - Rn	
GALIANEG	Rr – V ?	V – Rr ?
LATIN	Rr – Rn - V	

Diouzh ar pezh hon eus gwelet, e welan me daou bal evit derc'hel gant studi an ereerezh e galianeg : kavout ur reolennadur reizhek, hag asantiñ e c'hellas bout damzishual an ereadurezh gant direizhadennoù ivez. Arabat disoñjal ivez e c'helle ar galianeg emdreiñ a-hed an amzer, ha marteze a gemm galianeg ar IV^{vet} kantved hag hini deroù ar milved (mar ne oa meur a rannyezh c'halianek).

PENNAD III

DISPLEGEREZH AR VERBOÙ

Liesegezh ar verboù

"*Nous ne connaissons que deux verbes.*".²⁸ Setu ar pezh a vefe stuz studi ar galianeg kant vloaz zo, hervez Georges Dottin. Daoust d'e evezhiegezh e oa studiet koulskoude meur a zibenn-verb gantañ e-barzh e benn-levr.²⁹ Gwelet en deus an tri gour unan, gour kentañ ha trede al liester, trede gour al liester stagañ, ha martezeadenn an amzer strizh. An traoù zo bet gwellaet a-hed an amzer, ha bremañ eo anavezet tro dro ugent verb gant P. Gastal da skouer.³⁰

Liesdoare ar verboù

Abalamour da genarroudoù ar skridoù hon eus kavet (roadennoù, pedennoù, kontoù micherourien...) n'eo ket anavezet stummoù-verb a-galz, hag alies e vez kavet ar memes verboù, ar memes displegadurioù. Evit gwir, pa'z e veze skrivet un dedi da skouer, a zo lies, e veze graet gant nebeut stummoù ar verboù nemetken³¹ :

ELVONTIV IEVRV.ANEVNO OCLICNO.LVGVRIX ANEVNICNO : amzer-dremenet strizh, trede gour al liester, e *Grenouilly* ; **ICCAVOS.OP PIANICNOS.JEVRV.BRIGINDONE CANTALON** : amzer-dremenet strizh, trede gour an unander e *Auxey* ; **MARTIALIS.DANNOTALI IEVRV.VCVETE.SOSIN CELICNON** (...) : amzer-dremenet strizh, trede gour an unander e *Alise-Sainte-Reine*.

Skouerioù a-galz a lak war-wel an amzer heñvel, pe a-vremañ, hag an trede gour peur-liesañ. Da bep seurt skridoù (*defixio*, pedenn, testenn lez...) e vez kavet o amzerioù hag o gourioù, ar memes-re dre vras. Un diouer bras evit studi ar galianeg, da gentañ-holl ar verboù. Evit peuranavezout displegerezh ar verboù, e vefe ret kavout skouerioù a bep stumm a c'hell kaout ar verb, e pep amzer, pep gour... Kavout testennoù hir ha "lennegel" a vefe gweladenn wir. N'hon eus ket c'hoazh. Da c'hortoz e c'heller sevel ur roll peuzglok a-amzerioù.

²⁸ DOTTIN G., *La langue gauloise : grammaire, textes et glossaires*, Genève, Slatkine Repr, 1985, p. 38.

²⁹ DOTTIN G., 1985, pp. 122-123.


³⁰ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 74 : "*Finalemant, on trouvera quand même quelque quarante verbes gaulois dans le dictionnaire ci-après.*"

³¹ DELANOY A., *Choix d'inscriptions en vieux-celtique*, Brest, Ar Skol Vrezoneg, 2003, pp. 41-43.

*An displegadurioù***GOUR KENTAÑ AN UNANDER***Amzer-vremañ-diskleriañ*

Evit studial ar pezh a vefe gour kentañ an unander en amzer-vremañ-diskleriañ, eo ret deomp sellout resis ouzh pemp stumm-verb a zo bet kavet : **imi** hag **ιμμι**, **delgu**, **regu**, **uediiumi**, ha **pissiumi**. Hiziv int anavezet evel skouerioù ar gour kentañ. Da heul e welimp pep stumm dre resis, o stummadur, o liammoù, evit meizañ gour kentañ an amzer-vremañ e galianeg, hag an diaezamantoù a zo. An danvez da studial a ra diouer evel lod stummoù-verb all : bep gwezh eo kavet ur skrid nevez, e teu war-raok hor reiz eus ar galianeg. Koulskoude, n'hon eus ket a-walc'h c'hoazh evit tresañ un daolenn resis eus pep stumm e c'hellfed klevet e galianeg. Evit poent eo ret donaat ar pezh hon eus kavet.

Krogomp gant **imi** hag **ιμμι** : brudet ha kenemglevek eo ar stumm-verb-mañ, troet "*je suis*", (on, me zo) gant an arbennigourion a-holl. Anat eo ar ster pa'z eo keñveriet gant ar gresianeg *εἰμι*, an heniwerzhoneg *am*, ar saozneg *I am*, ar sanskriteg *ásmi*.³² Lambert a asant ar stumm gerdarzhel **es-mi* en indeg-europeg.³³ C'hoant am eus lakaat gerioù diwar an doare-skrivañ. Kavet eo alies ar stummoù "**imi**", "**ιμμι**" hag "**immi**" e skridoù an arbennigourien. An hini diwezhañ zo, d'am meno, ur fazi. **imi** zo ar stumm gwelet e galianeg-latin, hag **ιμμι** e galianeg-gresianeg. **ιμμι** zo ur stumm levezonet gant skritur rannyezhoù gresian. Ret eo mirout ar stumm-mañ, gant daou **μ**, hag ar stumm latin, **imi**. Re alies e vez kavet skriturioù dieub n'int ket gwir : "*immi*" n'eo ket gwelet e galianeg-latin morse.³⁴ Anavezet eo daou stumm, e galianeg-latin (**imi**) hag e galianeg-gresianeg (**ιμμι**), gant div skrivadenn. Ur skouerenn a bep stumm nemetken neuze. Er gartenn amañ dirak, lec'hioù a zo bet kavet **imi** hag **ιμμι** enne : *Sens*, ha *Les-Pennes-Mirabeau* (e galianeg-gresianeg, ar pezh zo anat evit skridoù *Galia Narbona*).³⁵ Gwelomp resisoc'h an daou skrid-se.



³² FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 349.

³³ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 62.

³⁴ MILLER D.G., *Ancient Greek Dialects and Early Authors: Introduction to the Dialect Mixture in Homer, with Notes on Lyric and Herodotus*, Berlin, Boston, DE GRUYTER, 2013, p. 256 : "First compensatory lengthening (CL-1) a) **es-mi* / > N. Aeol. *ἐμί*, most other dialects *ἔμί* / *ēmí* / 'I am'".

³⁵ KRUTA V., *Les Celtes : histoire et dictionnaire des origines à la romanisation et au christianisme*, Paris, R. Laffont, 2000, pp. 44 ha 45.

Hini galianeg-latin zo lennet war un droell-nezañ kavet e Sens (Yonne) : **GENETA IMI DAGA VIMPI** "(ur) plac'h on mat (ha) brav" : "*je suis une jeune fille bonne (et) belle*".³⁶



En eil emañ ar verb amañ. Aes a-walc'h eo troadur ar gerioù all, hep mar e c'heller meizañ ul lavarenn beurglok. Hoalus e vefe dezastum diouti un ereerezh hollek d'ar galianeg, peogwir hon eus amañ ur skouer a-feson. Koulskoude eo dedennus evit lakaat war-wel ur gudenn wir. Meur a frazenn c'halianek all zo bet kavet, ha koulskoude eo diaes c'hoazh asantiñ un ereerezh hepken : meur a hini zo kadarnaet. Chomomp gant al lavarenn-se, a guzh luziadurioù.

Me a wel un dro varzhoniel e framm ar frazenn, gant kengensonadurioù (**G-T-M-D-G-M**), ha kenvogaladurioù (**E-E-A-I-I-A-A-I-I**) : a oa graet a-ratozh marteze, hogen n'eo ket ret ; e-se e c'heller devezout eo bet lakaet ar verb en eil evit barzhoniañ ha bravaat al lavarenn (mard e kreder e c'helle bezañ dieub a-walc'h ereadurezh ar galianeg). Ouzhpenn-se eo arabat ankounac'haat eo bet skrivet war un droell-nezañ, un draig re vihan evit skrivañ lavarennoù hir. Marteze e vefe "reizhekoc'h" ar skid-mañ troet disheñvel, hiroc'h, pe, gant elfennoù ouzhpenn (**-ac** da skouer³⁷ : "*geneta imi daga vimpi-ac*"). Da glozañ e vefe diaes magañ ar preder diwar an ereerezh e galianeg gant ar skouer-mañ : a c'hell kaout meur a abeg : barzhoniezh, bihander an dra, deskadur ar skriver...

Diwar ar "varzhoniezh" e c'hellomp spisaat c'hoazh ster ar gwiaderezh evit ar Gelted (gwelet hon eus eo skrivet al lavarenn ouzh un droell-nezañ). E-barzh an *Táin Bó Cúalnge*, eo liammet ar werzhid gant an tonkad, dre zeskrivadur *Fedelm*, un diouganerez. Evit ledanaat, e c'heller ivez sell ouzh an Indianed-europeaned ; dezhe e oa ar wiaderezh skeudenn ar varzhoniezh. Testeniet eo gant lavarennoù e yezhoù zo : e heniwerzhoneg e kaver *fáig ferb fithir*, troet "ar mestr a wiad ar ger" ; e hensaozneg e lenner *wordcroeft woef* : "ar varzhoniezh e wiad".³⁸

Difur hag her e vefe krediñ hep mar d'ul liamm etre an droell-nezañ-se ha ster barzhoniel ar gwiaderezh er meizad indek-europek. Ne vefe ket souezhus koulskoude mard e vefe prouet en dazont levezon ar c'hredennoù war skridoù ar vuhez bemdeziek.

³⁶ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 81.

³⁷ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 65.

³⁸ JOUËT P., *Dictionnaire de la mythologie et de la religion celtiques*, Fouesnant (Bretagne), Yoran Embanner, 2012, pp. 419 ha 961.

N'eo ket desket muioc'h a dra gant ar stumm galianek-gresianek, a zo bet kavet er Pennes-Mirabeau (Bouches-du-Rhône), war ur volenn : **ΕΔΚΕΓΓΟΛΑΤΙΑΝΙΑ<ΤΕΙ>ΟΣ ΙΜΜΙ** "je suis la propriété inaliénable d'Eskengolatos" ; **TEI** a oa bet skrivet goude ar peurrest, a-us **ΑΝΙΑΟΣ**.³⁹ Emañ ar verb e dibenn al lavarenn, a grog gant an dro-gaout : disheñvel ouzh ar skouer hon eus gwelet gant **imi**, a oa ar verb en eil. Diouzh ar skouerioù **imi** hag **ιμμι** eo anat o ster ("on"), hogen an ereerezh a chom kevrinus. Koulskoude hon eus desket e chome e galianeg ur roudenn eus ar gour kentañ indek-europek (**es-mi* > **imi**).

Dalc'homp gant studi ar gour kentañ, dre ar stummoù gant **-u**. Merk gour kentañ an amzer-vremañ-diskleriañ e vefe. Aes da dreiñ eo an div skouer hon eus, nes ouzh ar brezhoneg : **delgu** (delc'h) ha **regu** (ren). Ha ne ra ket diouer keñveriadurioù gant yezhoù all.

Krogomp gant **delgu**, "je contiens", skrivet war un hanafig, kavet e Banassac. Vendryes en deus lennet ar stumm-se asantet gant an holl hiziv : **neddamon delgu linda**, "je contiens la boisson des suivants".⁴⁰ Berr-ha-berr, e c'heller studial al lavarenn a-bezh, tro-dro ar verb. A-zivout an anv : tro-gaout lies un anv-gwan **neddamos** eo, a vefe derez-uhelañ ar rakverb **ned-* "auprès".⁴¹ Aes eo keñveriañ gant ar yezhoù keltiek (brezhoneg *nesañ*). Diwar **linda** : tro-renadenn-lies "boisson" en deus daou ster e kembraeg (evaj ha loc'h) : *llynn* ; brezhoneg *lenn* ; heniwerzhoneg *lind* (evaj ha stank).⁴² Me a ro ur ger all a-hiziv liammet d'am meno : ar brezhoneg *lindrenn* (indu, lifr) ; skrivet eo adalek an 18^{vet} kantved d'an nebeutañ.⁴³ Ur skouer all zo gwir d'am meno : ar brezhoneg *lin* (lin-brein).⁴⁴ Evit donaat e c'heller kounaat e oa er Bed keltiek liderezhioù liammet gant ar verenn hag an hanaf.⁴⁵ Marteze e oa kaset d'unan d'egile un hanaf ; ha marteze e oa hini Banassac graet gantañ evit lidoù ?

³⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 89.

⁴⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 139 ha FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 354. Koulskoude e oa lennet "**Neddamon delgu linot**" gant Dottin in DOTTIN G., *La langue gauloise : grammaire, textes et glossaires*, Genève, Slatkine Repr, 1985, p. 165.

⁴¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 53.

⁴² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 139.


⁴³ *Lindrenn*, in Devri, <http://www.devri.bzh/dictionnaire/l/lindrenn/>.

⁴⁴ HENRY V., *Lexique étymologique des termes les plus usuels du breton moderne*, 1900, p.183.

⁴⁵ JOUËT P., *Dictionnaire de la mythologie et de la religion celtiques*, Yoran Embanner, 2012, pp. 167, 271-272.

Sellomp ouzh ar verb **delgu** bremañ. Emañ en eil el lavarenn. Lambert a gav ar c'helf-verb **delgh-* "tenir, contenir".⁴⁶ Gastal a adsav an anv-verb **delgir*.⁴⁷ Kavet eo ar c'helf e meur a yezh : kembraeg *daly* (dalc'h), hag e brezhoneg *delc'h*, *derc'hel*⁴⁸, *kendalc'h*⁴⁹ ; henvrezhoneg *delgim* "je tiens", kernevveureg *dalghen* "tenue, prise, étreinte".⁵⁰ Gastal a wel ar ger e yezh Beauce (France) : *dalée*, "grande quantité" ; brezhoneg "dal !", heniwerzhoneg *condelg* "comparaison", latin *in-dulgeo* "je ne retiens pas", sanskriteg *darh-* "tenir & être fort".⁵¹ Amañ eo diskleriet lec'h ar verb gant div vartezeadenn : hervez W Dressler e vez kreizet war ar verb al lavarenn pa vez skrivet hec'h-unan hep-mui, ur "frazenn-testenn" ; hervez C Watkins, eo amañ ur frazennadur barzhek pe lidek ; an daou hent-se evit displegañ emañ ar verb en eil.⁵²

War "*blad Lezoux*" eo skrivet ar verb all a achu gant **-u** : **regu**, troet "renan" (me a ren). Ret e vefe lenn "**ne regv. na**[...]". Sklaer eo ar skritur, ken sklaer distag ar gerioù. Hervez Lambert e c'heller degemer "*diriger, lever*" evit treiñ an anv-verb.⁵³ Keñveriet eo gant ar galianeg *rix*, ha gant yezhoù keltiek all : heniwerzhoneg *reg-*, henvrezhoneg *re(g)* (*diriger, régir*) ; ha gant al latin : *rego, rex*.⁵⁴ Brudet kenañ ha studiet eo ar gerioù liammet gantañ, dre "*re-*" alies. Da skouer eo gwelet e brezhoneg gant : *ere, eren, ereet, kevre*,⁵⁵ marteze *gouren* hervez Fleuriot (*gou-* ha *ren*).⁵⁶ Hag e yezhoù all : latin *rex* ; gresianeg *orego* ; iwerzhoneg "*Conradh na Gaeilge*" ; galleg *roi, région, régir*⁵⁷ ; sanskriteg *rjuh* (reizh) ha *raja* (ri), saozneg *right*, germaneg *recht*.⁵⁸



⁴⁶ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 139.

⁴⁷ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 166.

⁴⁸ "I can become r by dissim. : (...) Br. arall ; Br. derc'hel (...)", §256, in LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961.

⁴⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 139.

⁵⁰ GASTAL P., 2013, p. 166.

⁵¹ FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 354.

⁵² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 69.

⁵³ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 134 ha 147.

⁵⁴ FAVEREAU F., 2017, p.282.

⁵⁵ FAVEREAU F., 2017, p.141.

⁵⁶ FAVEREAU F., 2017, p.282.

⁵⁷ FAVEREAU F., 2017, p.282.


⁵⁸ GASTAL P., 2013, p. 214.



Abalamour d'an dibenn-ger **-u** e c'hellomp krediñ eo anat amañ kentañ gour an unander.⁵⁹ Keñveriet eo alies gant "**tid ollon reguccambion exsops**" (Chamalières),⁶⁰ lavarenn diaes da dreiñ. Mar n'eo ket anat ster resis ar frazenn, al liamm etre "**reguc-**" hag ar stumm-verb "**regu**" a zo.⁶¹


Gwelet hon eus eo bet kavet daou stumm-verb e gour kentañ an amzer-vremañ a achu gant **-u**. Koulskoude e weli n'eo ket an doare e-unan da sevel ar stumm-se e galianeg. Div wezh all eo kavet ur raganv-rener lostgeriet "**-mi**".

Deomp pelloc'h, dre skouerioù **uediiumi** ha **pissiumi**. Skrivet eo **uediiumi** ouzh un dablezenn kavet e Chamalières, troet "**pedan-me**", "**je prie, j'invoque**". Lambert a lenn :



**andedion uediiumi diiiuion risun
artiu mapon arueriatin**

*"J'invoque Maponos arueriatis par la force
des dieux d'en-bas"*⁶²



En eil emañ ar verb. Gellout a reomp her

c'heñveriañ gant meur a yezh : iwerzhoneg *guidid* "*il prie*", kembraeg *gweddi* "*prier*"⁶³ ; germaneg *bitten*, saozneg *bid*.⁶⁴ Resisoc'h c'hoazh eo Delamarre : iwerzhoneg *guid* "*prière*" (*g^whodhiā), *geiss* (*g^wessis < *g^whedh-tis) "*tabou*", brudet kenañ dre wenngelouriezh Iwerzhon ; avesteg *jaidiemi* "*je demande*" ; gresianeg *thessáthai* (*g^whedhs-) "*demander par des prières*".⁶⁵ Gant Delamarre e vez lakaet ivez an indeg-europeg *g^whedh- "*prier, invoquer, demander*" e orin ar verb ; dre resis eo bet lakaet *g^whedhijō "*je prie*", gant M. Lejeune.⁶⁶ Delamarre a lak ouzhpenn-se ul liamm martezeüs gant ar skrid kavet e Cimiez : **Matr(on)es Uediantiae**, mar n'eo ket tennet eus *uedh- "*conduire*" > "*marier*".⁶⁷

⁵⁹ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, pp. 134 ha 147.

⁶⁰ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 151 ha 157.

⁶¹ FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p.141 ha 282.

⁶² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 152.

⁶³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 152.

⁶⁴ FAVEREAU F., 2017, p. 363.


⁶⁵ DELAMARRE X., 2018, p. 310.

⁶⁶ DELAMARRE X., 2018, pp. 309 ha 310.

⁶⁷ DELAMARRE X., 2018, p. 309.

Diwar stummadur **uediúumí**, eo bet studiet mat an traoù ivez. Gellout a reomp meizañ ar stummoù **-umi** (**uediúumí**, **pissiumi**) evel **-u** + **-mi** ; e-se e vefe **-u** dibenn-ger ar gour kentañ, ha **-mi** ur raganv-rener lostgeriet, evit "me" : asantet bremañ gant an holl.⁶⁸ Ar raganvioù-rener lostgeriet (**-mi**, **-ti** ha **sies** ivez, lennet e Chamalières ha Larzac...) a vefe troioù-damall hen, ***mē**, ***tē** hervez Lambert a heul Schmidt.⁶⁹ Lambert a gas d'hor c'houn ivez e vez kavet verboù a-galz pouezet gant raganvioù-rener lostgeriet er yezhoù keltiek : kembraeg *barnaf-i* "je juge, moi", heniwerzhoneg *beirid-seom* "il porte, lui".⁷⁰ Evit ar brezhoneg e lakan ivez : *me gar me* hag ivez *din me*, *evidon me*... Mar n'int ket lostgeriet ar raganvioù amañ, lakaet int ouzhpenn, da heul ar verb, evit pouezañ bepred.

N'eo ket **uediiumi** ar skouer nemetañ e-barzh skrid Chamalières. **pissiumi** e c'heller lenn ivez, a vefe tennet



eus ar verb a dro "gwelout", "voir" hervez Lambert, e-skoaz an heniwerzhoneg *ad-ci* "il voit" < **k^wisiet*. Al lavarenn a vefe troet : "aveugle je vois".⁷¹ Hogen al lennadur zo diaes, ha n'eo ket peurdroet c'hoazh an destenn a-bezh. Linennoù 9 ha 10 ar skrid zo eilskrivet gant Lambert : "**tid ollon reguccambion exsops | pissiumítsoccantí rissuis onson**".

Penaos disrannañ resis ar gerioù ? Marteze e vefe staget **-t** ouzh **pissiumi**, mar n'eo ket staget ouzh ar ger a heul, **soccantí**. Neuze e redfe lenn *pissiumit*, lennet "je le vois" gant Lambert.⁷² D'am soñj eo amañ un hent dedennus : gwelet eo mat an dibenn-ger **-t** e trede gour an unander (a vo gwelet pelloc'h) : **senit**, **sesit**, **neat**... Ret e vefe adsevel neuze : **exsops pissiu-mi-t** : "dall gwel-an-me-eñ" ("aveugle je le vois").⁷³ Roudenn dispar ur raganv kengeriet e vefe amañ. Un elfenn bouezus-ruz evit meizañ yezhadur ar galianeg.

⁶⁸ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 66 ; GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 81 ; ha FAVEREAU F., *Celticismes : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 359 ha 363.

⁶⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 66. Hag ivez, in LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961, §93 : "In monosylls. the final vowel, whether followed by a consonant or not, remains. (...) Final -e became -i (...) hence Ir. mé 'I' W. mi Co. my, me Br. me : IE *me."

⁷⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 67.

⁷¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 158.


⁷² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 158.

⁷³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 158.

Ha n'eo ket pouez nemetañ ar ger **pissiumi**. Lambert a vir ur vartezeadenn a-boell diwar skritur ar ger. Abalamour d'ar *-s* e dibenn ar ger araozañ, **exsops**, e c'hell bezañ un divouezhadur e penn **pissiumi**, a redfe adsevel **bissiumi*. Ur c'hemmadur skrivet e galianeg ? Liammet a vefe neuze gant *bissiet "il sera"*.⁷⁴ Diouzh ar pezh hon eus gwelet, eo diaes lakaat un doare-skrivañ pe un troadur resis evit ar ger **pissiumi** / **pissiumit** / **bissiumi** / **bissiumit**. Koulskoude eo anat an dibenn-ger *-u*, merk gour kentañ an amzer-vremañ, hag ar raganv lostgeriet *-mi*, studiet abretoc'h. Dianatoc'h ar raganv *-t*, hag al lizherenn-penn **p/b**.

Evit berraat e vefe digelfek **imi** e galianeg (on), *-mi* a zeufe eus **es-mi*. Ar stummoù-verb **imi** hag **ιμμι** a dalvfe "on, me zo". O lec'h el lavarenn n'eo ket anat. An dibenn-ger *-u* a verke gour kentañ an amzer-vremañ e galianeg, hag a-wezhioù e vefe lakaet *-mi* evit pouezañ war ar gour. Evit gwir, n'eo ket ken souezhus un displegadur gant *-u* : Lambert en deus studiet-se resis. An /ū/ a vefe emdroadenn an /ō/ indek-europek pa'z emañ er silabenn-dibenn. Skoueriet gant ar verb **uediiu** < **g^whedh-iō*.⁷⁵

Amañ dirak lec'hioù resis hon eus kavet enne roudoù ar gour kentañ en amzer-vremañ. E ruz stummoù **imi** hag **ιμμι** (Sens, Les-Pennes-Mirabeau), e ruz-melen ar stummoù **-u-mi** (Chamalières), hag e melen ar stummoù **-u** (Banassac, Lezoux). Gallout a reomp krediñ eo re dost al lec'hioù ma oa graet gant stummoù disheñvel (**-u** / **-u-mi**) evit chom hep bout anavezet etreze.



⁷⁴ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 158.

⁷⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 41.

EIL GOUR AN UNANDER*Amzer-vremañ-sujañ*

P.Y. Lambert a zezev a c'helle bezañ an amzer-vremañ-sujañ e galianeg.⁷⁶ Meur a stumm a vefe bet kavet neuze, e eil ha trede gour an unander, hag e trede al liester.

Krogomp gant **lop/tites** ha **sníeθθic**, war daolennig Chamalières. Emañ meur a gudenn amañ. Kudenn skrid an daolennig a-bezh a chom an heñvelder etre al lizherennoù **t** ha **p**. Alies e vez meizet **lopites** memestra gant an arbennigourion. Gwelet e vez amañ un doare-gourc'hemenn ; pe un doare-sujañ, gourc'hemenn a-dalvoud.⁷⁷ Hervez Lambert eo ret kaout un dielfennadur all. Ne c'heller ket derc'hel gant studi **lop/tites**, hep her stagañ d'ar gerioù a heul : **lop/tites sníeθθic sos brixτία anderon**, skrivet war an drede linenn. **sos** a vefe ur raganv, ha **brixτία anderon** a dalvfe "*par la magie des (dieux) infernaux*".⁷⁸

Sellomp **lop/tites sníeθθic** bremañ. Lambert a dres ur stumm orin **lop/tites snies-ti-c**. Doareoù-sujañ e vefe, eil gour an unander. Ur raganv kengeriet a vefe staget ouzh **snies** : **snies-ti**, e doare **-mi**.⁷⁹ Kenurzhiat a vefe **snies** ouzh **lopites** gant ar genurzh **-c**. Ha n'eo ket souezhus kavout **θθ** e galianeg evit skrivañ an *affriquée* /st/.⁸⁰ Troadur **lop/tites** zo diaes. E brezhoneg e vez kavet *lopañ*, *lop*, e gloc mat gant kenarroud taolennig Chamalières ; ouzh al latin e c'hellfe bout keñveriet *loquor*, "*dire*".⁸¹ Evit **sní-** : "*torturer*" hervez Lambert, diouzh "*tordre, filer*". Klevet er yezhoù keltiek : heniwerzhoneg *sní-id* "*il tord, file*", kembraeg *nyddu* "*filer*", brezhoneg "*nezañ*".⁸² Gant-se, e vefe ret treiñ :

lop/tites sníeθθic sos

"*que tu les (lop/tites) et que tu les tortures toi*".

⁷⁶ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 63.

⁷⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 151, 153, 154.

⁷⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 154, 155.

⁷⁹ Cf p. 14 ; LAMBERT P.-Y., 1994, p. 154.

⁸⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 154. Gwelet eo bet **sníeθθic** evel ur raganv-gour kenurzhiat ouzh **sos** gant arbennigourien. Lambert a lak poentoù pouezus a-enep : ret e vefe kavout ***snīs** e lec'h **sní** evit treiñ "ni" ; ret e vefe kavout **etic** e-lec'h **eθθic**.

⁸¹ FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 357.

⁸² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 154.

Doare-gourc'hemenn

An doare-gourc'hemenn a vefe lennet e galianeg e-barzh skridoù zo. Eil gour an unander zo kavet nemetken. Stummoù an doare-gourc'hemenn a vefe : **lubi**, **gabi**, **luge**, **luxse**, **andigs** hag **incors**.⁸³ Gant **lubi** ha **gabi** e vefe gwelet ar c'helf-verb "en noazh", hep dibenn-ger, a vefe merk an doare gourc'hemenn.⁸⁴

Tri skrid hon eus a zo kavet **lubi** enne ; daou e Banassac, hag unan e La Graufesenque.

- Skrivet ouzh un hanafig, e Banassac⁸⁵ : **lubi rutenica onobia | tiedi ulano celicnu**
Gant Lambert e vez troet al linenn gentañ "*Aime les (coupes ?) rutènes.*" Koulskoude e c'hellfe bezañ tennet **rutenica** eus anv ar poder. N'eo ket anat an eil linenn. **lubi** a vefe un doare-gourc'hemenn.

- Ouzh ul lestr, Banassac⁸⁶ : **]citan atesolos |]lubi tarcot esoes**
N'eo ket anat, na da dreiñ, na da lenn. Anavezet eo **lubi** nemetken.

- Enskrivadur La Graufesenque : **lubi caunonnas sincera**. *sincerum* "gwin glan" e latin ; **caunonnas** a chom kevrinus evit Lambert (marteze ul lec'h anv ?).⁸⁷

Ar ger **lubi** a zo un orin indek-europek anat : **lubh* / **leubh* "aimer, désirer."⁸⁸ Roudoù zo en henezhoù : goteg *liufs*, henc'hermaneg uhel *liob*, hensaozneg *lēof*, henslaveg *ljubiti*, sanskriteg *lúbhyati*, oskeg *loufir*, latin *lubet* / *libet* / *libīdō* / *lubīdō*,⁸⁹ latin henstumm *lubare* (*plaire*), henc'hermaneg uhel *luba* → germaneg *liebe*, hensaozneg *lufu* → saozneg *love*.⁹⁰ Hag er yezhoù a-vremañ : gouezeleg skos *liobh* (*amour, attachement*),⁹¹ saozneg *love* (< hensaozneg *lufu* < **lubō* < **lubhā*), albaneg *laps* (< **laubitja*),⁹² Ul liamm en deus graet Gastal, n'eo bet ket heuliet gant arbennigourien all : ar brezhoneg "lubaniñ".⁹³ Koulskoude eo tost tre ar ger : me a gred eo amañ un hent da gemer.

⁸³ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 63.

⁸⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 63.

⁸⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 140.

⁸⁶ Lennet gant Lambert in LAMBERT P.-Y., 1994, p. 140.

⁸⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 144.

⁸⁸ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 195, DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 209.

⁸⁹ DELAMARRE X. 2018, p. 209.

⁹⁰ GASTAL P., 2013, p. 195.

⁹¹ GASTAL P., 2013, p. 195.

⁹² DELAMARRE X. 2018, p. 209.

⁹³ GASTAL P., 2013, p. 195. Delamarre a skriv diwar **lubi** : "*Il est très remarquable que ce mot ait disparu sans laisser de traces en celtique insulaire : c'est autant par l'amont indo-européen que par l'aval néo-celtique que la lexicographie gauloise doit s'effectuer.*"

Lennet eo ar ger **gabi** war droell-nezañ Saint-Révérien :

MONI GNATHA GABI | BUDDUTTON IMON

Troet gant Lambert : "*Ma fille, prends mon petit...*" **gabi** a c'hell bezañ keñveriet ouzh an iwerzhoneg *gaibid* "il prend".⁹⁴ Gastal a zo boas da sevel anvioù-verb, a lak "**gabir*", ha gerioù o defe un orin heñvel : kembraeg *gafael*, kernevveureg *gavel*, henc'hermaneg uhel *geban*, saozneg *give* ha *gift*, latin *capere* hag *habere*.⁹⁵ Hag all, gant Delamarre : heniwerzhoneg *gaibim* / *gabál*, henvrezhoneg *gabael*. En indeg-europeg e vefe **ghabh-*.⁹⁶

luge zo lennet war daolennig Chamalières. An "*imprécation finale*", zo adskrivet gant Lambert⁹⁷ : **luge dessumíís luge dessumíís luge dessumíís luxe**. Kevrinus a-walc'h. Gant Lambert eo keñveriet *dessum-* ouzh an heniwerzhoneg *dessum* "*à ma droite*" ; **luge** ha **luxe** a vefe doareoù-gourc'hemenn.

incors, plomenn Larzac 1b13 : **incors onda bocca**. Troet aes : "*ferme leurs bouches*" ("dizigor" o fegoù). *cor-* a vefe "lakaat", hag *in-* ur rakverb "e-barzh, war".⁹⁸

andigs n'eo ket anat. Marteze ur verb en doare-gourc'hemenn, pe un anv-oberer. Lennet war blomenn Larzac.⁹⁹

⁹⁴ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 123.

⁹⁵ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 195, DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 176.

⁹⁶ DELAMARRE X., 2018, p. 173.

⁹⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 158.

⁹⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 170.

⁹⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 63 ha 170.

TREDE GOUR AN UNANDER

Kalz roudennoù an trede gour zo ganomp e galianeg. Anat eo abalamour da abegoù implij ar skritur e galianeg. Gwelet e vo amañ ar skouerioù en amzer-vremañ, dazont, ha tremenet. Reoù an amzer-dremenet-strizh hon eus kavet zo ar re ziaesañ da studiañ : chom a ra diemglevioù c'hoazh.

Amzer-vremañ-diskleriañ

Pierre-Yves Lambert a soñj e oa **-ti** stumm kentañ dibenn-ger ar verboù en amzer-vremañ-diskleriañ, gant dizibenngeradur an **i** : **senit, neat**.¹⁰⁰ Siwazh ar skouerioù a glokfe zo diaes da lenn ha da dreiñ. Netra anat eta evit poent. Roet e vez div skouer : **neat** ha **senit**.

Sellomp ouzh **neat** neuze, kavet e
Argenton sur Creuse, skrivet war ur brok.



Lennet gant Lambert **LABRIOS NEAT VXOVNE**¹⁰¹ ; n'eo ket anat an **T** er ger **NEAT**, a heñvel ouzh un **I** ; koulskoude eo lennet **T** memestra gant Lambert. E gwirionez n'ez eus ket troc'h ebet etre ar gerioù, hogen skrivet eo mat a-walc'h. An dibenn-ger **-os** a aesa anaoudadur ur rener, **LABRIOS**, a vefe un anv-den. Lennet e vez **NEAT** ar ger a heul.¹⁰² Ret e vefe gwelout trede gour an unander.¹⁰³ Aes da grediñ : an daou ger all a zo anvioù-tud, liammet a vefe ar verb gant unan anezhe : ret eo an trede gour neuze. Keñveriet eo gant al latin **-nuo, adnuō**,¹⁰⁴ hag an heniwerzhoneg **as-noí**, evit treiñ "fiz" (eñ a... "*il confie*").¹⁰⁵ Kavet eo en henvrezhoneg : **adnou**.¹⁰⁶ Evit berraat, n'eo ket peuranat c'hoazh troidigezh ar skrid. Un anv-den a vefe ar ger kentañ, hag an hini diwezhañ marteze. Ar verb a dalvfe "*il confie*", pe "*a confié*" marteze, gant Delamarre, bez e vefe en amzer-dremenet, pe a-vremañ.¹⁰⁷

¹⁰⁰ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 63.

¹⁰¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 138.

¹⁰² DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 233 ; LAMBERT, 1994, p. 138 ; FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 358.

¹⁰³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 138.

¹⁰⁴ "*j'accorde par un signe de tête*", DELAMARRE X., 2018, p. 233.

¹⁰⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 138.

¹⁰⁶ FAVEREAU F., 2017, p.358 : *adnou*, "depositum".

¹⁰⁷ DELAMARRE X., 2018, p. 233.

senit zo skrivet war blommenn Larzac, tu 2a, linenn gentañ. Lambert a lenn]**a. senit conectos**[, hogen ne dro ket e galleg. Koulskoude e vefe trede gour an unander marteze¹⁰⁸ : gwelet hon eus e oa an dibenn-ger **-t** (***-ti**) merk an trede gour hervez Lambert. Diaes eo amañ mont pelloc'h gant ar ger-se. Anavezet mat eo ar skrid-mañ, rak hir eo, ha diaes da dreiñ : n'eo ket troet an destenn a-bezh. Marteze hon eus memestra ur stumm-verb all eus **senit**, a vefe trede gour al liester : **senant**.



Amzer-vremañ-sujañ

Roudoù trede gour an unander a vefe ivez war blommenn Larzac ha Chamalières. Ar stummoù kavet zo : **lunget-uton-id**, **buet-id**, **bueθ**, ha **biiet-utu**. E c'hwec'hvet ha seizhvet linennoù, tu 1a plommenn Larzac, e weler **lunget-uton-id**¹⁰⁹ :

eianom . uoduiouderce lunget | [?]utonid ponc . nitixsintor si[es

Aesoc'h eo ar meizadur abalamour d'ar poentoù. Al lavarenn a-bezh a vefe neuze : **uoduiouderce lunget | [?]utonid ponc**

Koulskoude e vez miret ur stumm all gant Lambert : **lunget[?]utonid ponc . nitixsintor si[es**, evit sevel al lavarenn **lunget-uton-id ponc ni-tixsintor sies**, troet "*qu'elle relâche celui qu'elles auront frappé de defixio*".¹¹⁰

E orin **lunget** e vefe **logh-*,¹¹¹ kavet en heniwerzhoneg *fo-loing* "*endure, supporte*", e kembraeg *ellwng* "*relâcher*".¹¹² **-uton-id** a vefe ur raganv lostgeriet. Skoaz ar c'henarroud zo pouezus amañ evit meizañ pe veizañ an destenn : lod gerioù nevez zo bet kavet war blommenn Larzac, diaes an troadurioù.

¹⁰⁸ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 63 ha 162.

¹⁰⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 160-161.

¹¹⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 167.

¹¹¹ Pe **legh-* > **longh-* hervez Delamarre ? Cf. DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 211.

¹¹² LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 167.

Amzer-dazont

War daolennig Chamalières e vez lennet ur stumm all eus trede gour an unander : **bissíet**.

El linenn 10 ha 11 Lambert a lenn :

pissíummítsocantí rissuis onson

bissíiet luge dessummiís luge

Ouzh an heniwerzhoneg *biëid* e keñver **bissíet**, evit treiñ "*il sera*". Anavezet eo amañ kelf ar verb "bezañ" **bi-*, emdroet diouzh **bhwi-*. Lakaet e vefe ouzhpenn an enger *-sy^e/o-* evit an tro-c'hoantaat. Hervez an arbennigour e vefe dav mirout al lavarenn¹¹³ : **socantí rissuis onson** | **bissíiet**. Troet eo gantañ al lavarenn : "*avec cela, il sera à nous devant vous (grâce à vous)*".

Amzer-dremenet-strizh

An amzer-dremenet-strizh zo anavezet ganeomp dre skouerioù a-leizh. Peurvuañ anezhe zo trede gour an unander. Koulskoude e vez merzet meur a zoare sevel gant Lambert.¹¹⁴ Hervezañ, lod anezhe (*ειωρον/ieuru, ειωραι/ieuri, δεδε, sioxti*) zo hen *perfect*, gant doubladur, lod all n'o deus ket doubladur, hogen ur penngef en *-o-*.¹¹⁵ Skouerioù stummoù-verb gant doubladur a ro Lambert¹¹⁶ :

eior- < **pe-por-(H)-*.

δεδε < **dhe-dhHe-e* < **dheHe-* ("*il a donné, il a offert*"), lennet ouzh un dogenn e Nîmes.¹¹⁷

sioxti < **se-sag-t-* (*il a cherché*), lennet war niveradur poder er Graufesenque.¹¹⁸

¹¹³ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 151 ha 158.

¹¹⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 63-64.

¹¹⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 64.

¹¹⁶ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 64.

¹¹⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 86-87.

¹¹⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 133.

ειωρου

Kavet alies ar ger-mañ. Gwir e bouez e-touez ar skridoù galianeg. E Vaison a zo bet kavet ur skrivadenn lennet hep mar, graet mat a-walc'h. Setu adskrivadur Lambert :¹¹⁹

σεγομαρος

ουιλλονεος

τουουτιους

ναμαυσαις

ειωρου βηλη

σαμι σοσιν

νεμητον



ha troet e galleg gant an arbennigour :

"Segomaros fils de Villū, citoyen de Nîmes (ou : avec les c.), a offert à Belesama cet enclos sacré".

E Brezhoneg e lakan ivez :

"Segomaros mab Villū, keodedour Nîmes, en deus profet da Belasama an Nevedenn-se."

Aes eo an droadur. A-se e c'heller kavout ster ar verb hep mar. **ειωρου** a dalvfe "en deus profet". Koulskoude a chom en don elfennoù. N'eo ket anat da Lambert distagadur ar ger : /eioru/ pe /ioru/.

IEVRV

E galianeg-latin e vez lennet ur stumm all eus ar verb-se. Kavet e Couchey, eo skrivet ouzh ur sil arem. Adskrivet gant Lambert¹²⁰ :

DOIROS SEGOMARI

IEVRV ALISANV

Ha troet :

"Doiros fils de Segomarus (l') a offert au dieu d'Alise".



Lambert a gas da goun deomp e oa troet **ieuru** "en deus oberiet" gwezhall. Skrivet a vije an dedi gant an arzour e-unan. Bremañ eo anatoc'h an droidigezh "en deus profet" : an arzourien a c'hellent kinnig un dedi doareet da bep werzhourien ; hag ar re-se da brofañ d'un doue bennak o zraoù dediet.

¹¹⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 84-85.

¹²⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 135.

IEVRV a zo bet kavet meur a wezh er skrivadennoù galianeg-latin. Setu skouerioù :

RATIN BRIVATIOM
FRONTV.TARBEISONIOS
IEVRV

"*Frontū fils de Tarbeisū a offert le ratis*
(rempart ou gué ?) des habitants de Briva"



Kavet e Naintré. Kizellet eo al lavarenn brudet-se war beulvan.¹²¹ N'eo ket anat ster **RATIN**. Dedennus eo **IEVRV** amañ abalamour d'ar varren staget d'al lizherenn *E*, a-zehou. Gwelet e vez amañ nemet ur fazi eus ar kizellour. **TARBEISONIOS** zo lennet **tarbetis[co]nios** gant Delamarre.¹²² Gwelloc'h din.

E Genouilly e oe kavet, war vaen savet¹²³ :

ELVONTIV
IEVRV.ANEVNO
OCLICNO.LVGVRIX
ANEVNICNO

"*Aneunos fils d'Oclos et Lugurix fils*
d'Aneunos (l') ont offert à Eluontios"

E Sazeirat, war vaen¹²⁴ :

SACER PEROCO
IEVRV DVORI-
CO . V . S . L . M

"*Sacer, du Périgord (?), a offert (ce)*
portique"

E Auxey, war vaen¹²⁵ :

ICCAVOS. OP-
PIANICNOS.IEV-
RV.BRIGINDONI
CANTALON

"*Iccaunos fils d'Oppianos a offert (ce)*
cantalon à Brigindona"

¹²¹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 92-94.

¹²² DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 334.

¹²³ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 94-95.

¹²⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 95.

¹²⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 96.

E Autun¹²⁶

**LICNOS CON-
TEXTOS. IEVRV
ANVALONNACV
CANECOSIDLON**

*"Licnos Contextos a offert au sanctuaire
d'Anvalō (ce) canecosedlon (sorte de
siege)"*

E Nevers¹²⁷ :

**ANDE-
CAMV-
LOS. TOVTI-
SSICNOS
IEVRV .**

"Andecamulos fils de Toutissos (l') a offert"

E Saint-Germain-Sources-Seine¹²⁸ :

**A
RESE
QVANIA
RIIOSIOVRVS
LUCIONERTECOMA**

*"Les Riverains de Seine (et) Ariios ont offert
(l'effigie de) Lucios fils de Nertecomaros"*

E Alise-Sainte-Reine¹²⁹ :

**MARTIALIS . DANNOTALI
IEVRV . VCVETE . SOSIN
CELICNON ETIC
GOBEDBI . DUGIIONTIIO
VCVETIN
IN ... ALISIIA**

*"Martialis fils de Dannotalos a offert à
Ucuetis ce bâtiment (celicnon), et cela avec
les forgerons qui honorent Ucuetis à Alise"*

¹²⁶ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 96-97.

¹²⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 97.

¹²⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 97-98.

¹²⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 98-102.

Kavet en ur puñs-bez¹³⁰ : : **e... ieuri rigani rosmertiac**. Troet gant Lambert : "*j'ai (ou : il a) offert cela à la Reine et à Rosmerta*". N'eo ket anat koulskoude.

euru

Ur skrivadenn war ur plad a zo bet kavet gant ar stumm *euru*¹³¹ : **serucnus euru num autogniu duci**

Skouerioù all an amzer-dremenet-strizh a vefe kavet hep doubladur, penngef **-o-** :

TOŠOKOT[E

Kevrinus al lenn hag ar ster. Skrivet ouzh un maen e-barzh un destenn e galianeg, troadur unan e latin a-us. Ar verb graet gantañ e latin "DEDIT" (en deus roet), zo harpet outañ troadur ar verb e galianeg.¹³² Lennet e vez **TOŠOKOTE** alies (Pisani, Meid, Eska, Koch). Lambert a gas menoz e c'hellfe bezañ keñveriet ouzh an heniwerzhoneg *do-ucc* < **to-onke-* [*il a donné*].¹³³

αουωτ / avvot

N'eo ket skañv pouez ar stumm verb *auo-* e-touez ar pezh hon eus kavet e galianeg. Arouezel eus an oberiataerezh priboazhel, ar stumm *avot* zo kavet alies ouzh ar poazhpriennoù. Evit gwir e oa boazh d'an oberourien lakaat ur skrid ouzh an traoù graet ganto a roe o anvioù (tro-rener), heuliet gant *avot* pe *fecit*.¹³⁴ Ster *fecit* zo sklaer e latin : "en deus graet". Ar gevatalded gant ar galianeg a vefe anat. *avot* a dalvfe "en deus graet". Ar stummoù kavet, e galianeg pe latin a vefe berraet a-wezhioù : *avo*, pe *ao* ; *fec*, *fe*, *f*. Koulskoude ne vefe ket *avot* ar stumm kentañ, nag ar stumm gwir. Lambert a lak war-raok ar skriturioù graet e galianeg-gresianeg evit hen diskouez : *αουωτ* distaget *αυ-ωτ* a lak ac'hanomp da adsevel ar stumm galianeg-latin *avvot*. Studi *avvot* n'eo ket achu : stummoù all a zo bet kavet : *avoti*, *avotti*, *avote*, *avotis*. N'eo ket aes meizañ ster pepini : displegadurioù disheñvel ? Raganv lostgeriet¹³⁵ ?

¹³⁰ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 145-146.

¹³¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 145.

¹³² LAMBERT P.-Y., 1994, pp 76-78 ; DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 299.

¹³³ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 76-78.

¹³⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 118-119.

¹³⁵ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 120.

P-Y Lambert en deus savet ur roll dedennus eus skouerennoù *av-* hon eus kavet, n'eo ket peurglok koulskoude.¹³⁶ Reiñ a ran anezhi, hogen n'eo vo ket studiet ganin, re hir e vefe, ha ne vefe ket poellek amañ.

Iullo(s) avot

Flav(os) avo(t)

Auctus avote / A(u)ctus Avotti

Bucc(i)os avotis

Rutenus av(ot)

Sacrillos avot

Iulos avot

Vichy

Gavidus avot pe Pavidus avot

Clermont-Ferrand

Iulios avo(t) pe Iulius avo(t)

Corpus Inscriptiorum Latinarum

ACUTIOS AVOT

Corpus Inscriptiorum Latinarum

C ANTON(IUS) AVOT

Bourbon-Lancy

BITO AVOT

DVRVCV AVOT ha DVRVCV AVO

Cologne, Trèves

IVLLO(S) AVOT

Rheintürkheim

TROVS AVOT

Bingen

VASEN [] AVOT

]OS AVOT

Vallée-Saint-Denis

] AVOT

ATEANO SACRILLOS AVOT ANAILOS

Meaux

SACRILLOS CARATI AVOT FORMI

Toulouse

REXTUGENOS SVLLIAS AVVOT

Caudebec-en-Caux

FRONTV SII / AVOT

Corpus Inscriptiorum Latinarum

(A)VDILLUS / AVOT

Arc d'Orange

CASA[TUS] AVO

Bavai, Trèves

CITOS AVO

Metz

FLAV[IOS] AVO

Lezoux

ORTI[] AVO

¹³⁶ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 120-122.

VEN[ANTIVS] AVO	Heiligenberg
IVLIVS AVO <i>ha</i> IVLIOS AVO	Châlon sur Saône, Dalheim
RVTENVS AV	Lezoux
ERICV AV	Koethe
INTINCILV AV	
AVCTVS AVOTE	l'Hospitalet
DVRATI AVOTE	Lezoux
AVCIRIX AVOTI	Nimègue
BOLLO(S) AVOTI	Trèves
VALIINS AVOTI	Cusset, Vichy
VOCAR[AVOTI	Coblence
A(V)CTVS AVOTTI	Rodez
EVINI AVOTTI	Vichy
BVCCOS AVOTIS	Gand



Sinadurioù priboazhourien n'int ket roudoù nemeto stummoù *av-*. E Saint-Germain-Sources-Seine a zo bet kavet ur maen kizellet, sinet : ΔΑΓΟΛΙΤΟΥΣ . ΑΥΟΩΥ (adskrivet gant Lambert ΔΑΓΟΛΙΤΟΥΣ. ΑΥΟΩΥ<T> ; hag e lizherennoù bihan : δαγολιτους . αυωωυ).¹³⁷ Troet eo : "*Dagolitus en deus graet*".



tioinuoru

Diaes da dreiñ e brezhoneg. Kavet e Banassac, war un hanafig. Trede gour an unander en amzer-dremenet-strizh a vefe, gant ur rakverb *tí-* pe *tio-*, un enger **sin* pe **sosing*, hag ar c'helf *uōr-* < **we-wr-*, da geñveriañ ouzh an heniwerzhoneg *-fuair* "*a trouvé*".¹³⁸

¹³⁷ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 89 ha 97.

¹³⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 141.

Stummoù-verb all, a vefe tennet eus an amzer-zispis sigmaek :¹³⁹

LEGASIT

Kavet e Bourges, war ul lestr, lennet **BUSCILLA SOSIO LEGASIT IN ALIXIE MAGALU**, troet "*Buscilla a déposé (offert) ceci pour Magalos en Alixia*".¹⁴⁰ Ur gensonenn dre fic'hal a vefe, eeunet : **lega-s-t + it > *legatsit (a placé)*. Hervez Lambert eo gwelloc'h tremen "*-it*" evel ur rannig lostgeriet, evit un dibenn-verb all. Ar c'helf a vefe **leggh-* "kousk, lakaat".¹⁴¹

readdas

Ret e vefe kavout amañ an elfenn (*p*)*ro-*, deuet da vezañ *re-* e galianeg daleüs. En heniwerzhoneg e kaver *ro-*, ha neuze **ro-ad-dhH_e > rat-* "*a donné*". E galianeg e vefe eeunet an dibenn (adsevel **ro-ad-da-s-t*).¹⁴²

prinas

Troet *prenañ* hep mar ar c'helf gant Lambert. Keñveriet ouzh an heniwerzhoneg *crenaid*, ar brezhoneg *prenañ*, ar c'hembraeg *prynu*, ha *prynaf* (gour kentañ) < **k^wrinami* < **k^wri-n-H-*. Stumm *preterit* e kembraeg : *prynas*.¹⁴³

LOGITOI

Kavet eo bet e Nérís-Les-Bains ur skrivadur war vaen, a vefe ur verb ger diwezhañ.¹⁴⁴ Hervez Lambert eo ur verb en amzer-dremenet-strizh, trede gour. Ar ster "*a établi, a fondé*", a vefe tennet eus **logho-* pe **leggh-*. Ar pezh n'eo ket sklaer : an dibenn *-toi*, souezhus e keltieg.¹⁴⁵

BRATRONOS

"Bratronos fils de Nantonos a établi un

NANTON{T}ICN

leucution pour Epadatextorix, en

EPADATEXTO-

association avec ses sœurs."

RICI.LEVCUTIO

SUIOREBE.LOGI-

TOI

¹³⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 64.

¹⁴⁰ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 199.

¹⁴¹ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 136-137.

¹⁴² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 64.

¹⁴³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 133.

¹⁴⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 105.

¹⁴⁵ DELAMARRE X., 2018, pp. 206-207.

TREDE GOUR AL LIESTER

Tost ouzh hini latin e vefe trede gour al liester.¹⁴⁶ Ret eo her skrivañ : ne vefe ket troet gerioù a-galz hep keñveriañ gant hen yezhoù all, latin da-gentañ. Evit meizañ mat peseurt liamm a c'hell bezañ etre latin ha galianeg, setu ar pezh e kavomp e latin evit trede gour al liester :

amzer-vremañ : *amant / moment / agunt / audiunt / capiunt*

amzer-dremenet : *amabant / monebant / agebant / audiebant / capiebant*

amzer-dazont : *amabunt / monebunt / agent / audient / capient*

Anat eo ivez an heñvelder ouzh ar stummoù keltiek all, arnevez zoken¹⁴⁷ :

amzer-vremañ : krennvrezhoneg *queront* ; krenngembraeg *carant*

amzer-dremenet : krennvrezhoneg *caient* ; krenngembraeg *kerynt*

amzer-dazont : brezhoneg *karint*

Abalamour d'an nester ouzh stummoù yezhoù all e vez lennet meur a c'her galianeg evel stummoù trede gour al liester :

SENANT, diligentir, DUGÍONTIÍO, sagitiontias, biontutu.



Sellomp ouzh **SENANT**, skrivet ouzh ar "*Pilier des*

Nautes", e Paris. Graet e vez ul liamm gant ar stumm *senit* (plomenn Larzac), a chom hep bezañ troet c'hoazh.¹⁴⁸ Ne chom ket an holl lizherennoù amañ : **SENANT V...ETLO...** e c'heller lenn.¹⁴⁹ Marteze trede gour al liester hervez an arbennigourien.¹⁵⁰ Lejeune ha Favereau¹⁵¹ a adsav ur verb **sen-*, a dalvfe "*gounit, seveniñ*". Ret e vefe meizañ "*sevenont...*". Kavet eo ar gerdarzh-se e meur a yezh : sanskriteg *sanóti (il gagne)*, gresianeg *ánūmi (je réalise, j'achève)*...¹⁵² Mard e vez meizet **-nt** evel merk trede gour al liester, ar pezh a vefe anat diouzh ar c'heñveriadur, **SENANT** a vefe roudenn nemeti ar stumm-mañ resis (hep mui) hon eus kavet.



¹⁴⁶ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, p. 82, Gastal a skriv a-zivout **dugiiontíio** ha **toncsiiontíio** : "*Il est possible aussi que ces verbes soient des 3^{es} personnes du pluriel (au futur ?), le -io terminal représentant, comme -mi ci-dessus, le pronom personnel, en l'occurrence ils. Dans ce cas, la désinence du verbe serait -ont ou -ontí, ce qui serait assez logique si on la compare avec la terminaison latine correspondante.*"

¹⁴⁷ Skouerioù hen stummoù verb e kavor in LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961. *queront* ha *caient* kavet p. 278, hag all...

¹⁴⁸ FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 361 ; DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 269.


¹⁴⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 107. Favereau a skriv : "**senant u[-] etlon...**" (FAVEREAU F., 2017, p. 361).

¹⁵⁰ LAMBERT, 1994, p. 63 ; FAVEREAU F., 2017, p. 361.

¹⁵¹ FAVEREAU F., 2017, p. 361.

¹⁵² DELAMARRE X., 2018, p. 269.

Koulskoude hon eus gwelet e vez anavezet stummoù all ar gour-se. Ar pezh a ziaes an traoù eo al lostgerioù o defe ouzhpenn. Heverzus eo gant ar ger **diligentir**, war blommenn Larzac a vefe ur skouer all eus trede gour al liester. Lambert a lenn **uonus coetic diligentir . c** [. ¹⁵³ Mar n'eo ket troet




gantañ, eñ a wel trede gour al



liester-gouzañv. ¹⁵⁴ Evit Gastal ivez n'eo c'hell ket bezañ un anv-verb daoust da **-ir**, rak **-ent-**. ¹⁵⁵ Resisoc'h eo Delamarre : un *déponent* pe un tu-damc'houzañv a vefe. ¹⁵⁶ Hervezañ e c'hell bezañ **-tir** merk an tu-damc'houzañv, a deufe euz **-tēr**, tost ouzh an iwerzhoneg (*labritir*) pe ar marrucineg (*ferenter*). Diforc'hoù zo memestra gant an troidigezhioù. Gant al latin *dēligō/-āre* "lier, attacher" e keñver Delamarre, hag eñ da dreñ **diligentir** "qu'elles soient liées" pe "qu'elles lient". ¹⁵⁷ Menoz disheñvel gant Gastal, a wel ar rakger indek-europek *dis-* (a lak un disrann, un diforc'h), hag al latin *ligo, ligare*, "liammañ". ¹⁵⁸ An anv-verb a vefe troet *déliar* kentoc'h gant Gastal. Fleuriot a lak ur gerdarzh all, a rofe an heniwerzhoneg *dligim* "j'ai droit à". Ret e vefe lenn "sont mérités" (heniwerzhoneg *dlegtair*).

Dalc'homp gant ar stummoù lostgeriet, ha sellomp ouzh **DUGIŌNTIŌ**, lennet e Alise-Sainte-Reine. ¹⁵⁹ Ur skouerenn vray kenañ eus ar skridoù war-vaen : stummet mat al lizherennoù, poentoù etre ar gerioù, n'ez eus ket gerioù "troc'het". Koulskoude, (ha n'eo ket ur gudenn evit lenn), ez eus ereadurezhioù ha bihanaduroù na ziaez al lenn : alies e-vez kavet, sklaer ken alies. Abalamour d'al lizherennoù "i" hir, e vefe distaget marteze **du-gi-yon-ti-yo**. ¹⁶⁰ Un **Ī** heñvel e vez kavet er ger **ALISIĪA** (*a-lis-si-ya* ?). Aes eo krediñ e vefe stummet ar ger-mañ gant ur c'helf ha meur a zibenn-ger. Ret eo bremañ diverzout pep hini.



¹⁵³ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 161.

¹⁵⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 63.

¹⁵⁵ GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013, pp. 73 ha 167. Skrivet e vez **-ir**, **-ar** hag **-er** evit an dibennoù-verb gant Gastal, rak e soñj ne oa ket pouezet dibenn ar gerioù. Arbennigourien all a skriv **-ire**, **-are** hag **-ere** kentoc'h.

¹⁵⁶ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 144.

¹⁵⁷ DELAMARRE X., 2018, pp. 144-145.

¹⁵⁸ GASTAL P., 2013, p. 167.

¹⁵⁹ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 63, 98-101.

¹⁶⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 101.

➤ **-ÍO** : keñveriet eo bet ar ger **DUGÍONTÍO** ouzh an heniwerzhoneg gant Rudolf Thurneysen e 1908 rak an dibenn-ger **-ío** : ar rannig-stagañ **-io** a vefe kavet e-barzh an heniwerzhoneg **bheront(i)-io > berte*.¹⁶¹ Anavezet eo ar rannigoù-stagañ er yezhoù keltiek : engeriet e c'hellfent bezañ en heniwerzhoneg (evit verboù kevrennek), marteze en henbredeneg.¹⁶² Roudoù **-io** a vefe e kembraeg : *yssydd* (brezhoneg "zo" ?) < **esti-io / *est-io*. Hervez Lewis ha Pedersen, e c'hell **-jo* (indek-europek **jo-s*) mont da vezañ **ijo*.¹⁶³ Marteze e c'hellfe adsevel ar rannig stagañ **-ÍO** e-lec'h **-ÍO** ?

➤ **-NTI / -NT** : merk trede gour al liester.¹⁶⁴ Da geñveriañ ouzh "senant" ha "diligentir".

➤ **DUGI-ÍO-** : a-zivout kelf ar ger, n'hon eus ket gerioù all da geñveriañ anat gantañ, nag e keltieg, nag en indeg-europeg. Koulskoude, rak e vefe **UCUETIN** (un anv-doue) renadenn ar verb, e c'heller treiñ **DUGÍONTÍO** "*qui honorent, qui vénèrent, qui servent*".¹⁶⁵ Evit-se e vez lakaet war-wel **dugio-** gant Michel Lejeune, troet "*je fabrique, façonne*", keñveriet gant ar gresianeg *teúkhō*, hag an indeg-europeg **dheugh-*. Ret e vefe meizet **UCUETIS** evel un anv-boutin, a dalfe "metal"¹⁶⁶ (pe "tra graet dre veli **UCUETIS** / gant ar c'hoved (tud **UCUETIS**)" ?). Martezeadenn all, keñveriañ ouzh "docni", kavet e-barzh anvioù-tud.¹⁶⁷ Ken diaes da dreiñ. Kavet e vefe e latin *ducere* ; en henvrezhoneg *duc, doc* ("*porte*", verb) ; e brezhoneg "doug", "dezoug" ; e kembraeg *dwg*.¹⁶⁸

En diwezh, n'eo ket aes treiñ **DUGÍONTÍO**, na keñveriañ gant stummoù pe verboù all. Martezeadennoù a lak war-raok tri hent evit kavout ster an anv-verb : "oberiata", (i.e. **dheugh-*, gresianeg *teúkhō*) ; "enoriñ", abalamour d'ar c'henarroud ; ha "douger", abalamour d'an heñvelder ouzh stummoù predeneg.

¹⁶¹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 99 ; DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, pp. 153-154.

¹⁶² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 67.

¹⁶³ LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961, p. 243, § 397 (3).

¹⁶⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 101.

¹⁶⁵ DELAMARRE X., 2018, p. 153.

¹⁶⁶ DELAMARRE X., 2018, p. 153.

¹⁶⁷ FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 305.

¹⁶⁸ FAVEREAU F., 2017, p. 355.

Souezhus, ur ger tost kenañ e kavomp war blommenn Larzac, gant kudennoù heñvel, tu 2a, linennoù 8 ha 9 : **sagitiontias**.¹⁶⁹ Troc'het e vefe ar ger, **sagitiont** el linenn 8, hag **ias** lienenn 9. Aes a-walc'h da lenn ar gerioù. Ur gudenn memestra : torret eo tuioù ar blommenn, gallout a rafe ober diouer lizherennoù etre **sagitiont** hag **ias**. Setu ar pezh a lenn Lambert :

sagitiont-
ias seuerim lissatim licia-
tim anandognam

Evit meizañ mat kenarroud al lavarenn-se, eo ret sell ouzh al lavarenn a-raok :

ne lisatim ne licia-
tim . ne rodatim . biont-
utu semnanom


Ster don an destenn a chom kevrinus. Diaes eo distagañ pep ger, kavout ster pep hini, meizañ an displegadurioù, an ereadurezh. An elfennoù sevenadurel, relijiel a ziaes ivez : skeudennus a c'hell bezañ gerioù pe droioù-lavar. Diskouez a ra eo ret alies labourat war an holl dachennoù evit meizañ testennoù zo. Koulskoude eo bet roet troadurioù gallus a-walc'h.

sagitiontias a vefe penn-kentañ ul lavarenn a heul unan all. Kregiñ a rafe gant ur verb, a glaskfe tostaat ouzh al lavarenn gentañ marteze. An anv a heul, *Severa*, zo un dro-renadenn. Hervez Lambert e vefe gwelloc'h gwelout stumm ur verb en trede gour, gant ur raganv lostgeriet, e-lec'h ur ger-etre : **sagitiont-ias**.¹⁷⁰

Ne c'heller ket chom hep keñveriañ gant an anv-verb ***sagi-ti-** (*fait de chercher*)¹⁷¹ ; boutin er yezhoù indek-europek (***sāg-** / ***sæg-** "*quêter, flairer, rechercher*")¹⁷² : latin *sāgīre* (*flairer, deviner*) ; gresianeg *hēgēomai* (*conduire*) ; goteg *sokjan* (*rechercher*).



"(ces femmes) qui sollicitent Severa, la sorcière par l'écriture, la sorcière par le fil, l'étrangère."



"qu'il ne puisse y avoir de sorcière par l'écriture, de sorcière par le fil, de sorcière donneuse, parmi ces femmes"

¹⁶⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 171.

¹⁷⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p.171.



¹⁷¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p.171.

¹⁷² DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 264.


Kavet eo er yezhoù keltiek ivez : heniwerzhoneg *scél-aige* (narrateur), *gat-aige* (voleur), *saigid* ("chercher à atteindre, tendre vers, rechercher") ; henvrezhoneg *-hei-*, *-he-* ; kembraeg *-(h)ai-*, *-(h)a-*¹⁷³ ; iwerzhoneg *saiged*.¹⁷⁴ Evit mont pelloc'h gant *sagi-*, e c'hellomp lakaat war-wel eo eñ kavet a-galz e-barzh an anvioù-divoutin.¹⁷⁵ Sklaer tamm-pe-damm ster *sagi-*. Gouzout a reomp e vefe *-nt* merk an trede gour. *-ias* a chom da zisplegañ. Hervez Lambert e c'hell bezañ un dro-envel/renadenn lies, pe un dro-gaout unan.¹⁷⁶

Ur pevare verb e kaver gant ul lostger kevrinus. War blomenn Larzac eo skrivet.¹⁷⁷ Meur a wezh eo kavet gant un diforc'h skritur evit unan anezhe :


tu 1b, linenn 6 : **biontutu** ; linenn 11 : **biontutus**



tu 2a, linennoù 7 ha 8 : **biontutu**



tu 2b, linenn 7 : **biiontutu**



Evit

darn-vrasañ an arbennigourien e vefe amañ trede gour liester an amzer-vremañ-sujañ ; ar stumm **biontutus** a vefe lies.¹⁷⁸

Koulskoude, pa vez sellet rik ouzh ar blomenn, e c'heller krediñ e oa ur fazi, pe staget ouzh ur ger all diverket.



¹⁷³ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 264.

¹⁷⁴ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 171.

¹⁷⁵ DELAMARRE X., 2018, p. 264.

¹⁷⁶ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 55 ha 57.

¹⁷⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 161-163.

¹⁷⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 63 ; DELAMARRE X., 2018, p. 75 ; FAVEREAU F., *Celticismes : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017, p. 348.

Hewel eo an dibenn-ger **-nt-**. Hervez Lambert e c'heller gwelout da heul ur raganv lostgeriet, **-utu**¹⁷⁹ ; marteze e vefe ar c'helf-diskouez **to-*, en doa kemeret lec'h **so-* e-barzh yezhoù indek-europek.¹⁸⁰ Ouzhpenn-se e c'hellfe ivez bout adverbel **-utu** : "*alors, ainsi*".¹⁸¹ Delamarre a zalc'h un diforc'h all : **-ontu** a c'hellfe bezañ merk an doare-gourc'hemenn en amzer-dazont (**-ontōd**), gant "doubladur buhezek" ; tost-tost ouzh doare-gourc'hemenn an umbrieg e vefe neuze : *habetutu*. Ster resis an anv-verb a chom dianat. Ar yezhourien zo tennet etre daou : *bezañ, bout* (**bhūij-ont-* > *bijont-*) ; pe *skeiñ* (**bheiə-* [**bheiH-*]). Peogwir ez eus troioù-damall tro-dro ar verb, e vefe gwelloc'h *skeiñ* hervez Delamarre.¹⁸² Koulskoude, pa vez troet lavarennoù Larzac gant Lambert, e vez graet gant ar ster "*bezañ*" bepred. Gallout a reer adsevel **bh(y)i-ont-* "*qu'ils soient*" hervez Lambert,¹⁸³ ha "*qu'ils soient*", "*qu'il soit*", pe "*qu'il(s) frappe(nt)*" hervez Delamarre.¹⁸⁴

Evit renabliñ e c'heller skrivañ :

- red e vefe rannañ ar ger : **bio-nt-utu** pe **bi-ontu-tu**.
- abalamour d'ar c'henarroud, e c'hellfed devezout emañ ar stumm-mañ en dazont.

bio-nt-utu :

- **-nt** a vefe merk trede gour al liester
- isvoh-**utu** a vefe ur raganv lostgeriet :
- averbel : *neuze, e-se* ;
- ur c'helf-diskouez tennet eus **to-* ;

bi-ontu-tu :

- **-ontu** a vefe un doare-gourc'hemenn en dazont, tennet eus **-ontōd** ;
- **-tu** a vefe un "doubladur buhezek".

Ken dianat eo ster ar verb :

- ***bhūij-ont-** : *bezañ*.
Gwelloc'h diouzh meizadur an destenn.
- ***bheiə-** : *skeiñ*. Gwelloc'h diouzh gerioù tro-dro a zo troioù-damall.

¹⁷⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 169.

¹⁸⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 66.

¹⁸¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 170.

¹⁸² DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 75.


¹⁸³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 169.

¹⁸⁴ DELAMARRE X., 2018, p. 74.

KARNITUS

Skrivet e galianeg-etruskeg war-vaen, kavet e kichen Briona :

TANOTALIKNOI
KUITOS LEKATOS
ANOKOPOKIOS
SETUPOKIOS
ESANEKOTI
ANAREUIŠEOS
TANOTALOS
KARNITUS



"Les fils de Annatalos (*Quintus Legatus, Andocombogios, Setubogios*) et les fils d'Essanecottos (*Andareuiseos, Dannotalos*) ont érigé ce tumulus".¹⁸⁵

E diwezh an destenn e kaver ar verb, tennet eus **karno-*, iwerzhoneg *carn*, gouezeleg skos *cairn*, kembraeg *carn* "*tas de pierre*".¹⁸⁶ Sklaer eo ar ster, diouzh ar c'henarroud, pouezet gant tresadenn pevar rod, lakaet e tu kleiz an destenn. Lambert e-unan a gav diaes studi ar ger. Ar pezh a zo bet dianat hag a lakae meur a gudenn troidigezh a zo an *-s-* a-zibenn, ne vefe ket merk al liester hervez Lambert. Keñveriet ouzh ar skridoù keltiek-iberek, e c'heller krediñ n'ez eus ket liamm ebet etre an *-s-* hag al liester. Marteze eo ret gwelout *-tu* evit an dibenn, en amzer-dremenet-strizh, hag evit mont pelloc'h, *-intus*, evit trede gour al liester : **karnintus*.

χαρνιτου

E Saignon e c'helled ivez lenn *karnitou* e galianeg-gresianeg : *δβο [-]ιοο []ουει ματιχαν [] λιοει χαρνιτου* [: "...a érigé le *matica*".¹⁸⁷

karnitu

karnitu zo gwelet e stumm anv boutin e skridoù all, evel e Todi.¹⁸⁸

¹⁸⁵ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 72-73.

¹⁸⁶ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 72-73.

¹⁸⁷ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 106.


¹⁸⁸ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 74-76.

STUMMOÙ DIANAT

Gwir n'eo ket peurdroet pep tra c'hoazh. Gerioù a chom kevrinus, hag en o zouez a c'hell bezañ verboù. Koulskoude eo ral ar verboù a chom hep bezañ lakaet warne un damzroadur bennak gant ur yezhour pe yezhour. Amañ da heul e lakan skouerioù verboù n'int ket anat endeo o sterioù : hentoù zo peurvuiañ memestra. Krogomp gant stummoù ur verb diaes da studiañ, n'eo ket peuranat c'hoazh :

toncsesit, toncsiíontío


Kavet e Chamalières. Lennet "**toncsiíontío meion toncsesit buetid...**" gant Lambert¹⁸⁹ ; ha "**meion ponc sesit buet...**" gant Delamarre.¹⁹⁰ Gwir n'eo ket anat amañ an diforc'h etre al lizherennoù τ ha ρ en destenn. Ken diaes an disparti etre ar gerioù : hervez Lambert int lakaet a-wezhioù nemetken.



Pouezus eo an diaester : teir gwezh eo lennet "*t/ponc(-)*" e-barzh an destenn-mañ. Sellomp resisoc'h ar skrid. Setu ar pezh e c'hellfed lenn diouzh harz ar gerioù :

"etic se couitoncnaman

**tonc síontío meíon toncse sitbue
tid ollon regu c cambion exsops"**



Diouzh al lennadenn-mañ e c'heller meizañ eo ret dispartiañ disheñvel evit kaout gerioù gwir : n'eo ket anat "**regu c cambion**", pe "**couitoncnaman**" da skouer. Diaes eo an destenn-mañ. Ar gerioù a chom hep distagadur etreze a-wezhioù : ar pezh a c'hell bezañ komprenet. Souezhusoc'h eo an harzoù lakaet e lec'h n'e vefe ket ezhommm : "**regu c cambion**". Diaesoc'h lenn an destenn gant troc'hadurioù "diwir". Koulskoude, pa vez lennet an deroù, eo sklaeroc'h gerioù an div linenn gentañ, ha roll an anvioù dud (a zo anat o natur), o deus harzoù merket met alies. Gallout a reomp soñjal eo bet gwashoc'h-gwashañ ar skritur a-hed al linennoù. Ar pezh a gavomp e-barzh labour *deiziadur Coligny*, evit skoueriañ. Ha diaester brasañ : pelec'h emañ ar verb ?

¹⁸⁹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 151.

¹⁹⁰ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p.298.

Amañ ar pezh zo adskrivet gant Lambert, hag e droidigezh (troidigezhioù all zo) :

"etic secoui toncnaman

"...et tous ceux qui jureraient ce faux-serment. Quant à celui qui l'a juré, que ce soit pour lui la totale déformation des os droits."

toncsiíontío meíon toncsesit bue-

tid ollon reguccambion exsops"

Hag amañ lennadur Delamarre :

"etic secoui toncnaman (pe ponc naman)

toncsiíontío meíon ponc sesit (pe toncsesit) buet-

id ollon"

Diouzh e voaz, en deus studiet mat ha don Lambert ar skrid-mañ. Evit displegañ gerdarzh ha ster ar verb e vefe daou disoc'h hervezañ. Savet int war an diforc'h etre *tonk- ha *tong-.¹⁹¹ Anat hag anavezet eo an daou stumm er yezhoù keltiek. Ret eo meizañ n'eo bet ket sklaer an diforc'h evit an holl : ne oa ket asantet gant Koch.¹⁹² Anez rannet eo menozioù ar glaskerien etre *tonk- ha *tong-.

- *tonk- a dalvfe "tonkañ, jeter un sort". Dibabet gant Fleuriot. Klevet mat er yezhoù all : heniwerzhoneg *tocad*, krennc'hembraeg *tynghed*, brezhoneg *tonket*.

- *tong- a vefe troet "touiñ", kavet an orin heñvel e meur a yezh c'hoazh : heniwerzhoneg *tongaid*, kembraeg *tyngu*, hag ar brezhoneg, anat. Amañ eo dibab Lambert. War ar c'henarroud gwirel (a-varn) e pouez eñ.

N'eo ket aes donaat ster resis pep skouerenn skrivet e Chamalières. (**toncnaman**, **toncsiíontío**, **toncsesit**). Ne vefe ket **toncnaman** ur verb mes un anv.¹⁹³

etic... toncsiíontío zo keñveriet gant Lambert ouzh **etic... dugiontiio**.¹⁹⁴ Lakaet e vefe *etic + V* evit treiñ "*et tous ceux qui + V*". Un dro-goanagiñ a vefe, trede gour al liester, gant ur c'hengerstagañ *-io*.

Meur a hent zo evit meizañ **toncsesit** :

- Gallout a ra bezañ ur stumm verb **toncse**, trede gour an amzer-zispis sigmaek, gant dibennoù ger,

- Pe **toncses**, eil gour an amzer-zispis sigmaek, gant dibenn ger.

¹⁹¹ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 156.

¹⁹² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 156.

¹⁹³ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 156.

¹⁹⁴ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 156.

Stummoù verb a heñvel bout en amzer-dremenet, evel **iourus** ha **loncate** :

iourus

Lenet war vaen, Saint-Germain-Sources-Seine. A-zivout ar verb, n'eo ket sklaer an niver. Lambert zo tennet etre daou hent :¹⁹⁵

- unander "*Lucios fils de Nertecomaros a offert un ariios à Aresquana*", pe "*Le chef du district "Sources-Seine", Lucio(s) fils de Nertecoma(ros), a offert*" ;
- liester, troadur alies : "*Les Riverains de Seine (et) Ariios ont offert (l'effigie de) Lucios fils de Nertecomaros*".

Trede gour an unander pe al liester e vefe. Ster ar verb a c'hell bezañ hep mar "*en/o deus roet*", da geñveriañ ouzh **ievrv**, a vefe ur stumm all.

deuorbuetid, loncate, dama

Gwelet war plad Lezou. Outañ a zo bet skrivet lavarennoù kevrinus c'hoazh, en o touez "**ne regv. na**[...] hon eus studiet endeo. Diaes da dreiñ ar frazennoù all, koulskoude e c'heller bezañ anavezet verboù.

El linenn 6 : **nane devorbvetid loncate**[...] ¹⁹⁶

- **deuorbuetid**. Peuzanat eo an elfenn **-buetid**, displeget eus ar verb "bezañ" e galianeg, en trede gour marteze ; an elfenn kentañ zo keñveriet gant Lambert ouzh ar c'hembraeg *dyorfod* "*l'emporter, vaincre*".
- **loncate**. Troet "*vous jetez*", < **lanka-** "jeter", gant Lambert.

Linenn 7 : **nu gnate ne dama gvssov n**[...] ¹⁹⁷

- **dama** zo meizet e gelf-verb "*souffrir, supporter*" gant Lambert, padal e tro al lavarenn : "*maintenant fils, n'obéis pas à Gussus*", pe "*maintenant, fils, ne cède pas à la violence*".

¹⁹⁵ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 97.

¹⁹⁶ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 146.

¹⁹⁷ LAMBERT P.-Y., 1994, pp. 146-147.

Troiou goanagiñ pe c'hoantaat a vefe gant ar stummoù **marcosior** ha **tixsintor**.

marcosior

marcosior maternia, kavet e Autun, war un droell-nezañ zo kevrinus ha dedennus. Ur verb anvel a vefe, tennet eus *marco-*, "marc'h".²⁰⁶ Gour kentañ an unander a vefe, tu-etre pe zougouzañv.²⁰⁷ Ret e vefe rannañ : *marco-sio-r*. Al lostger *-sje/o-* a vefe merk un dro-c'hoantaat pe amzer-dazont.²⁰⁸ Mard eo sklaer ster gadal al lavarenn, diaes eo treiñ. "*que je sois chevauché / je serais chevauchée Maternia*", "*je veux être chevauché, O Maternia*", "*je veux chevaucher avec Maternia*"²⁰⁹, "*puissé-je (te) chevaucher les organes maternels*"²¹⁰

tixsintor

E-barzh skrid Larzac e vez lennet ur stumm **tixsintor**, adsavet al lavarenn : **lunget-uton-id ponc ni-tixsintor sies** : "*qu'elle relâche celui qu'elles auront frappé de défixio*".²¹¹ Hervez Lambert e vefe liammet ar gerioù "**ni-tixsintor sies**". **tixsintor** a vefe dic'houzañv, en trede gour al liester. Al lostger *-si* a vefe un dro-goanagiñ. **ni** zo meizet evel ur rakverb "d'an traoñ ?" **sies**, el liester (**sī*) a vefe ur raganv benel en unander, kavet er yezhoù arnevez endeo : iwerzhoneg *sí*, kembraeg & brezhoneg *hi*. Ouzh al latin e c'heller keñveriañ ar verb-se : *dēfīgo* (**dhīgh*), pe **s(t)ig-* "*piquer*" : germaneg *stechen* ha latin *instigare*. Ur wezh all eo ret din kemenn ur ger all, e krennvrezhoneg : *pistigaff*, diaes da zisklaeriañ gant ar galleg...

Dezastum e c'heller ivez verboù eus gerioù all. Da skouer **banaunom**.

barnaunom

War blommenn Larzac e lenner, tu 2a linenn 4 hag heul : ...**pon barnaunom ponc nitxsintor sies eia nepi andigs...**²¹² Lambert a geñver ar ger ouzh ar c'hembraeg "*barnaf, je juge*". Ken sklaer ar brezhoneg "*barnan, barn...*". Kavet eo ar gerdarzh **bhr-n-H-mi*, hag ul lostger *-uno-* deuet eus *-mno-*, a vefe un *agentif* keltiek. An arbennigour a wel amañ ur ger-etre, "*jugeant, rendant la justice*", hag eñ da sevel : "*tout homme en fonction de juge, qu'elles auraient frappé de défexion, qu'elle (Severa Tertionicna) annule la défexion de cet homme*".

²⁰⁶ DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018, p. 217.

²⁰⁷ DELAMARRE X., 2018, p. 217.

²⁰⁸ DELAMARRE X., 2018, p. 217 ; LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 125.

²⁰⁹ DELAMARRE X., 2018, p. 218.

²¹⁰ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 125.

²¹¹ LAMBERT P.-Y., 1994, p. 167.

²¹² LAMBERT P.-Y., 1994, p. 170.

δεδε βρατου δεκαντεμ

Lambert a stroll a-gevred al lavarennoù emañ "**δεδε βρατου δεκαντεμ**" en o barzh (pe **δεδε βρατου δεκαντεν**).²¹³ Bepred e vez kavet ar rener dirak ar verb. Koulskoude ne c'hellomp ket klozañ gant menoz e vefe amañ ar reolenn diwar urzh ar gerioù. Kavet a-galz eo an dro-skrid-mañ (un daouzegad), hag e c'hell bout boutin a-walc'h, ha kizellet alies gant ar C'halianed. Gwiriet eo ar boaz-se pa'y e sellomp ouzh berradennoù a zo bet studiet. Lambert a skriv a veze berraet ar ger diwezhañ nemetken (**δεκαντεμ**), stal ha pa oa **βρατου** ha **δεκαντεμ** ur ger nemetken ("**βρατουδεκαντεμ**"). Mar e oa daou c'her, e vefe berraet **βρατου** ivez. Pouezus eo ivez gouzout n'eo ket peuranat troadenn ar ger(-ioù ?)-se c'hoazh ("*a donné/offert par reconnaissance avec la dîme / pour réalisation du vœu*").

²¹³ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 86-89.

KLOZADUR

Klozañ ar c'hounskrid-mañ n'eo ket klozañ ma studi eus ar galianeg. An danvez keltiek dre vras kennebeut. Pa vez studiet ha labouret an danvez-se gant arbennigourien pe garourien, e vez kavet pep kwezh un elfenn pe ur sell nevez, ur meizadur gwelloc'h, hag a-wezhioù un diskoulm a-vat. Hogen bepred e vez ar ranellded o kreskaat anat, hag ar goulennoù o fonnañ.

Ledan eo tachenn ar studioù keltiek. Ur pouez gwir en deus ar galianeg en he zouez. Siwazh e vez divrudet hag isdoujet re alies, gant arbennigourien zoken. E kichen plaenenn ledan hag ec'hon al latin hag ar gresianeg, petra eo ar galianeg, yezh dilezet ha kollet ? A-drugarez d'ar glaskerien a-zec'h pe a-hiziv e c'hellomp bremañ meizañ eo ar galianeg ur puñs kuzhet hogen don ha fonnus, a zo ret deomp kavout en-dro, sachañ gouiziegezh dioutañ hag hel lakaat edan an heol. Ne vez ket graet hep bec'h. Al labour a galv c'hoazh arbennigourien all, studierien all. Ha n'eo ket gwelet c'hoazh don ar puñs. Chom a ra da lec'h pe lec'h testenabez da zizoloiñ.

Studial ar verb a oa din un doare da vont war wenodenn studi ar galianeg a-bezh. E-kreiz al lavarenn emañ ar verb. Gantañ e vez tostaet pep elfenn all. Evit her meizañ, eo ranket sellout ouzh ar gerioù en e dro. N'ouzer ket mat a-wezhioù pelec'h emañ ar verb el lavarenn. E-se e ouzomp penaos eo goull sac'h hor gouiziegezh eus ar galianeg. Gwezhioù all, e lenner un destenn nevez-kavet, a zo kalz gerioù ennañ anavezet, ha da vout ken anavezet displegadur ar verboù : ar galianeg a ro deomp e gevrin tamm-ha-tamm.

Kreñv eo al liammoù etre an danvezioù keltiek etreze. Dav eo bezañ ken kreñv an darempredoù etre ar skiantoù : ret bezañ dedennet gant an holl evit donaat gwir ur studi resis. Kavet am eus er skridoù galianeg kenarroudoù pouezus kenañ evit meizañ ster al lavarennoù. An arouezioù a c'hell bezañ ken pouezus. Gant-se ne c'heller ket mont war-raok hep sellout ouzh an hendraouriezh, ar gevredadouriezh, an hengeloniezh.

E-kreiz an elfennoù am eus desket, a chom kudennoù, skoulmoù liammet ouzh studi ar galianeg. Dedennus ha pouezus int. Gante e c'heller gouzout pelec'h eo ret deomp klask c'hoazh. Mat e oa din meizañ diaezamantoù ar yezhoniezh dre gudennoù. C'hoant am eus lakaat da heul skouerioù eus skoulmoù am eus kavet a-hed ma studi.

Da lakaat war wel ar c'hudennoù pennañ, e c'heller sellout ouzh ur yezh all, al latin. Miret eo bet betek bremañ abalamour d'an dud desket ha d'an Iliz. Ouzhpenn-se, eo bet kavet testennoù hir ha lennegel, ar pezh n'eo ket bet e galianeg. Gerioù pe lavarennoù berr, levezonet gant al latin pe ar gresianeg alies ; setu hêr hon eus eus yezh Dumnorix. N'eo ket bet kavet oberennoù skrivagnerien veur pe strujus e galianeg evel e latin ; neuze eo diaes diogeliñ ur poell resis e galianeg.

Kudenn gentañ studi ar galianeg a chom niver ar skridoù kavet : n'int ket stank. Gant-se e vez kavet alies ar memes seurt a skrid ; niverus an trede gour, ar verboù heñvel (**avot, ieuru...**). Ouzhpenn-se e chom da dreiñ un nebeud skridoù, pe c'herioù. N'eo ket aesaet pa'z e ouzer eo nes a-walc'h meur a c'her galianeg ha latin... Diouzh prantadoù ar skridoù kavet e c'hell bezañ mesket latin ha galianeg... Pe genluziet ar yezh implijet. Ober un diforc'h etre galianeg ha latin zo poellek, koulskoude a vefe ret ivez etre isyezhoù ar galianeg marteze. N'eo ket anat, ha n'ez eus ket emglev etre an arbennigourien evit gouzout e vefe ret rannañ ar galianeg diouzh broioù. Gant ar gerioù **EQVOS, QVTIOS**, ha **QVIMON** er deziadur Coligny hag anv ar "*Sequaned*", pobl galianeg, e c'heller krediñ e vefe un rannyezh e tachenn ar *Sequaned*, da skouer.

C'hoant am eus derc'hel gant ur skouer a ziskouez diaezamantoù a zo evit ar re a grog gant ar yezhoniezh. An nested etre daou c'her n'eo dalv ket int liammet gwir. Sellomp ouzh ar stumm-verb "**senant**". An diouizieg a welo amañ ar ger *senos*, gwelet ivez e latin, e galleg (*sénile, sénat...*), pe e brezhoneg (hen, henañ...). **senant** a vefe troet "koshaont" neuze. Ur fazi eo. *senant* a deufe kentoc'h eus **sen-[*senh₂-]* (kaout) ; da geñveriañ ouzh *senos*, **senos*. Ur fazi a c'hell bezañ graet alies. Setu perak eo pouezus ar gerdarzhadurezh e yezhoniezh pe genyezhoniezh.

Teir c'hudenn am eus kavet e penn kentañ evit studial urzh ar gerioù e galianeg. Da gentañ, lakaat an harz etre ar gerioù hag etre ar frazennoù. N'eo ket anat evit skridoù e galianeg, skrivet war vaen, pe briboazhadur, hep evezh bepred. Abalamour da se eo ret an arbennigour studial roudoù ar galianeg a-leizh, evit anavezout gerioù, troioù-lavar pe zoareoù-skrivañ. Chom a ra diaes, hag a-wezhioù e vez kavet lennadurioù disheñvel evit ur frazenn.

Eil kudenn, an ereadurezhioù, berradurioù, stummoù ha mentoù disheñvel, tammoù a-dra a ra diouer : an elfennoù-se e vez gwelet meur a wezh er skridoù e galianeg. Ur skouer vat : deziadur Coligny, en deus kalz gerioù kevrinus, berradurioù. Diaesoc'h eo ar meizadur peogwir n'eo ket anat mat gouiziegezhioù o doa evit gober an deziadur-se. Ha n'eo ket kavet ar pezh e ouzomp (ger relijiel ebet, anv gouelioù ebet...).

Da heul e chom displann alies meiz resis ar gerioù. Ur skouer vat zo bet studiet gant Lambert, "**δεδε/βρατου/δεκαντεμ**". Evit ar skridoù bravañ zoken, e c'hell bezañ diaes lenn mat hag hep mar ar gerioù penn-da-benn. Hini Alise-Saint-Reine zo kaer ha graet mat, pikoù etre ar gerioù, gant un c'henarroud anat a-walc'h. Koulskoude, abalamour d'an ereadurezhioù, da stummoù lizherennoù, ha da ventoù reoù all, e oa diaes da dreiñ ar skrid-se a-raok 1908.

Un darvoud a gavan dedennus a-galz, a-zivout an ereerezh. An ereadurezh a c'helle marteze kemm diouzh ar varzhoniezh. Evit kaout un niver resis a silabenn, pe sonadioù resis, e c'helle ar C'halianed kemm tamm-pe-damm ereadurezh o skridoù. Evit mont pelloc'h, e ouzomp hiziv o gare ar bobloù "geltiek" c'hoari gant an heñvelsonioù. Marteze eo ret deomp meizañ daou ster evit gerioù zo...

Un elfenn all a c'hell bezañ ivez, a zo levezon ar gomz war ar skritur. Lambert a lak war-raok ar gerioù **exsops pissiumí**. Hervezañ e c'heller krediñ e oa **bissiumi* ar ger en orin. Divouezhet a vefe lizherenn gentañ **pissiumí** abalamour da **-s** a-raok, **exsops**. Un darvoud klevet e meur a yezh all, e brezhoneg zoken (chas pihan, pep kwezh...).

Ar pezh n'eo c'hell ket bezañ divinet a zo ar stummoù direizh. Pa vez kavet ur seurt reolenn, ur framm damresis evit ur stumm eus ar verboù, eo diaes meizañ a c'hell bezañ verboù direizh ivez. Evit gour kentañ an amzer-vremañ, e kaver **-u**, evel **delgu**. Koulskoude evit treiñ "me zo" e kaver **imi**, **es-mi*.

Komzet am eus e-barzh ar studi-mañ eus ur gudenn a skritur etre an arbennigourien (**imi** skrivet *immi*). Un destenn kavet e galianeg a c'hell bezañ skrivet e doareoù disheñvel diouzh ar c'hlasker. N'eo ket souezhus pa'z eo un destenn diaes da dreiñ, a c'hell bezañ meizet a-likesdoare. Koulskoude e vez lennet ivez frammoù a c'hell bezañ luzius evit ar meizadur. Arbennigourien zo a adskriv alies lizherennoù bihan gant lizherennoù bras, pe ar c'hontrol. Pe lakaat lec'hioù a-re etre lizherennoù. D'am meno e vefe gwelloc'h adskrivañ resis ar pezh e kavomp, ha da heul, marteze, skrivañ endro en un doare "reizhet".

Kavout gerioù ha frazennoù, martezeañ peurrest ar gerioù, ha dezastum ster ar skrid. Al labour-mañ ne c'hell ket bout graet gant forzh piv. Arbennigourien meur a zanvez zo dav. E gwirionez eo ret sellout rik ouzh danvezioù all evit meizañ mat ar galianeg. Ret eo studial ar galianeg a-bezh evit studial ar verb e galianeg ; al latin hag ar gresianeg ivez, peogwir e oa yezhoù kempred, ha peuzheñvel eus ar galianeg, hag a veze graet gant o lizherenneg ; an Istorouriezh hag an hendraouriezh, peogwir eo pouezus ar c'henarroud evit meizañ ar skridoù pe ster ar gerioù ; politikerezh, kevredadouriezh, hengeloù ar "C'halianed", evit meizañ spered an dud-se, ha spisaat ster o gerioù. N'eo ket neuze ar galianeg ul labour a yezhourien nemetken, hogen dav eo dezhe gober gant skoazell arbennigourien danvezioù all.

Ne vefe ket arvarus lakaat berradur stummoù verb a anavezomp, diouzh amzer ha gour :

❖ Gour kentañ amzer-vremañ :

stummoù "reizh" **delgu, regu**
stummoù "direizh" **imi / ιμμι**
stummoù gant kengerioù **uediiumi, pissiumi**

❖ Eil gour amzer-vremañ-sujañ :

Doare gourc'hemenn

lop/tites, snieθθic

lubi, gabi, luge, luxse, andigs, incors

❖ Trede gour an

Amzer-vremañ-sujañ

Amzer-dazont

unander :

lunget-uton-id, buet-id,

bissiet

senit, neat

bueθ, biiet-utu

❖ Trede gour al liester

SENANT, diligentir, DUGÍONTIÍO, sagitiontias, biontutu

Amañ e harz labour poellus an arbennigour. Kavet hon eus roudoù verboù e galianeg, meizet eo tamm-pe-damm dibennoù-verb bennak, hag e c'heller ijinañ un hollegezh evit lod anezhe (adsevel "**delgi*", evit doare gourc'hemenn "**delgu**" ne vefe ket sot...). Koulskoude e vefe arvarus mont pelloc'h. C'hoant am eus memestra sevel un daolenn-geñveriañ, evit meizañ mat al liammoù a zo etre ar galianeg hag ar yezhoù a chom tost a-walc'h, rak indek-europek.

	GALIANEG		LATIN	GRESIANEG		BREZHONEG	KEMBRAEG
	<i>a.vremañ diskleriañ</i>	<i>a.vremañ sujañ</i>		<i>tu gra</i>	<i>tu damc'houzañv</i>		
1 u.	-u ?		-o	-ω (-o)	-ω-μαι (-o-mai)	-an / -on	-af
2 u.		-s ?	-s	-η-ς (i-s)	-η (-i)	-ez	-i
3 u.	-t pe -ti ?	-et ?	-t	-η (-i)	-η-ται (-i-tai)	-/	-/
1 l.			-mus	-ω-μεν (-o-men)	-ώ-μεθα (-o-metha)	-omp	-wn
2 l.			-tis	-η-τε (-i-te)	-η-σθε (-i-sthe)	-it	-wch
3 l.	-nt ?	-nt ?	-nt	-ω-σι(ν) (- o-si(n))	-ω-νται (-o-ntai)	-ont	-ant

LEVRLENNADUR

Galianeg

DELAMARRE X., *Dictionnaire de la langue gauloise : une approche linguistique du vieux-celtique continental*, 3^e emb., Paris, Éditions Errance, 2018 (heñvel ouzh embannadur 2003).

DELANOY A., *Choix d'inscriptions en vieux-celtique*, Brest, Ar Skol Vrezoneg, 2003.

DOTTIN G., *La langue gauloise : grammaire, textes et glossaires*, Genève, Slatkine Repr, 1985.

FAVEREAU F., *Celticisms : les Gaulois et nous*, Montroulez, Skol Vreizh, 2017.

GASTAL P., *Nos racines celtiques*, éditions désIris, 2013.

LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994.

LEJEUNE M. et R. MARTIN, « Stèle inscrite des sources de la Seine », *Revue des Études Anciennes*, 1956, vol. 58, n° 1, p. 71-82.

Istorouriezh, hendraouriezh

ALINEI M., ha BENOZZO F., *The Paleolithic Continuity Paradigm - Introduction*, <http://www.continuitas.org/intro.html>, lennet d'an 10 a viz Gwengolo 2018.

ARZEL EVEN, *Istor ar yezhoù keltiek*, Hor Yezh, 1987, vol. 2/1.

MARTINET A., *Des steppes aux océans : l'indo-européen et les « indo-européens »*, Paris, Payot, 1986.

RENFREW C. ha M. MIECH CHATENAY, *L'énigme indo-européenne : archéologie et langage*, Paris, Flammarion, 1994.

Kredennoù, hengounioù

GUYONVARCH C.J. et F. LE ROUX, *Les druides*, eil emb., Roazhon, Ogam-Celticum, 1978.

JOUËT P., *Dictionnaire de la mythologie et de la religion celtiques*, Fouenant, Yoran Embanner, 2012.

KRUTA V., *Les Celtes : histoire et dictionnaire des origines à la romanisation et au christianisme*, Paris, R. Laffont, 2000.

Yezhoniezh

ALINEI M., ha BENOZZO F., *The Paleolithic Continuity Paradigm - Introduction*, <http://www.continuitas.org/intro.html>, lennet d'an 10 a viz Gwengolo 2018.

BALL M.J. ha J. FIFE (ren.), *The Celtic languages*, London, New York : Routledge, 1993.

BOPP F., *Grammaire comparée des langues indo-européennes.*, 1866, vol. 5/1.

DROIXHE D., « Souvenirs de Babel », p. 246.

GABRIEL BERGOUNIOUX, *GRAMMAIRE COMPARÉE DES LANGUES INDO-EUROPEENNES*, <http://www.universalis.fr/encyclopedie/grammaire-comparee-des-langues-indo-europeennes/>, lennet d'an 10 a viz Eost 2018.

HENRY V., *Lexique étymologique des termes les plus usuels du breton moderne*, 1900.

LEWIS H. et H. PEDERSEN, *A concise comparative Celtic grammar*, Reprinted with corrections and supplement., Gottingen : Vandenhoeck & Ruprecht, 1961.

MARTINET A., *Des steppes aux océans : l'indo-européen et les « indo-européens »*, Paris, Payot, 1986.

MILLER D.G., *Ancient Greek Dialects and Early Authors: Introduction to the Dialect Mixture in Homer, with Notes on Lyric and Herodotus*, Berlin, Boston, DE GRUYTER, 2013.

RENFREW C. ha M. MIECH CHATENAY, *L'énigme indo-européenne : archéologie et langage*, Paris, Flammarion, 1994.

VENDRYES J., *Grammaire du vieil-irlandais : (phonétique - morphologie - syntaxe)*, Paris : Guilmoto, 1908.

Devri : Le dictionnaire diachronique du breton, <http://www.devri.bzh/> : Lindrenn, <http://www.devri.bzh/dictionnaire/l/lindrenn/>, lennet d'an 18 a viz Here 2018.

SKEUDENNOÙ

Amañ izeloc'h mammennoù ar skeudennoù gwelet er c'hounskrid-se. El lizherennoù tev anvioù an aozerien, al levrioù, pe al lec'hiennoù internet.

p. 21 :

- **University of Cambridge**, https://www.asnc.cam.ac.uk/spokenword/g_autun_sens.php

p. 22 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 89.
- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 139.

p. 23 :

- **l'Arbre Celtique**, <http://encyclopedie.arbre-celtique.com/plat-de-lezoux-3911.htm>

p. 24 :

- **l'Arbre Celtique**, <http://encyclopedie.arbre-celtique.com/plat-de-lezoux-3911.htm>
- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 151.

p. 25 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 151.

p. 30 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 138.

p. 31 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 162.

p. 33 :

- **musagora**, <https://www.reseau-canope.fr/cndpfileadmin/musagora/mondes-antiques-mondes-modernes/la-langue-gauloise/les-sources-mentionnant-la-langue-gauloise/>
- **l'Arbre Celtique**, <http://encyclopedie.arbre-celtique.com/menhir-de-naintre-vieux-poitiers-4192.htm>

p. 34 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 93.

p. 38 :

- **LEJEUNE M. et R. MARTIN**, « Stèle inscrite des sources de la Seine », *Revue des Études Anciennes*, 1956, vol. 58, n° 1, p. 71-82.

p. 40 :

- **Musée de Cluny**, <https://www.musee-moyenage.fr/collection/oeuvre/pilier-des-nautes.html>.

p. 41 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 161 ha 162.
- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 99.

p. 43 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 162.

p. 44 :

- **LAMBERT P.-Y.**, *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, pp. 161-163.

p. 46 :

- **Mnamon, Antiche scritture del Mediterraneo**, <http://mnamon.sns.it/index.php?page=Immagini&id=61&img=916&lang=fr>.

p. 47 :

➤ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 151.

p. 50 :

➤ LAMBERT P.-Y., *La langue gauloise : description linguistique, commentaire d'inscriptions choisies*, Paris, France, Ed. Errance, 1994, p. 160.